

Breizh Brevez

OR 25 BLOAZ !

BLOAVEZ MAD
E PEB FESON !

AN AVIEL E BREZONEG :

*eur pennad-kaoz gand
ar chaloni Elard*

N° 60 - 1982

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 60
Miz kerzu 1982.

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 60 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studierien: 40 lur.
- broiou estrañjour: 90 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennou-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Disklêriet hervez al lezenn: pevare trimiziad 1982.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an ôll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken. Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

25 bloaz.....	3
Roll al leoriou bet moulet e 1982 gand Brud Nevez	6
Bloavezh mad e peb feson.....	7
J.S.: An Aviel e brezoneg	21
Chaloni Elard: Ar Helou Mad e brezoneg an dud	22
Erwan Berthou: Ostaleri Surat	31
Yves Miossec: O haloupad war henchou Breiz-Izel III	37
Mikael Madeg: Dindan heol kraz ar Provañs	41
J.S.: Ar brezoneg: kollet e-touez ar zonerien?	43
P.M. Mevel: 30 barz troet e kembraeg	46
Keleier ar miz: Euz an eil devez d'egile	47

Digoradur

25 bloaz!

Darbet eo bet deom lezel ar bloavezh 1982 da dremen dizeblant, heb taol evez eo e 1957 an hini eo deut er-mêz niverenn genta ar gelaouenn **Brud**. E 1957: da lavared eo 25 bloaz 'zo deuz se. Da geñver seurt digouezioù e kustum lod en em voda da frikoa. Ha gwir eo e hellje beza bet ar hart-kantved-mañ eun digarez brao da skriva-gnerien ha da lennerien **Brud Nevez** d'en em gaoud asamblez. Med n'om ket boazet moarvad d'ober peb tra evel an oll...

En hañv 1957-eta an hini eo-bet embannet niverenn genta **Brud**. Ne oa beteg neuze nemed eur gelaouenn lennegel all o tond er-mêz. Piu a gredfe lavared hirio n'eo ket bet eur gonid e peb keñver embann unan all? E-keñver yez, e-keñver testennoù, e-keñver lennegezh, e-keñver sevenadur, e-keñver ar stourm, « *n'eo ket prest da veza dister - setu ar pezh a skrivem e pennad a zigoradur niverenn genta **Brud Nevez** - an oll varzonegoù, kanaouennoù, peziou, kontadennoù ha studiadennoù a beb seurt a zo bet kouchet e lizerennoù-moull euz an eil niverenn d'eben.* »

Ne heller ket, evel just, keñveria ar helaouennoù brezoneg a hirio gand ar re a wechall. Kaer he-deus **Brud** beza bet c'hoant da « *stanka ar foz a (oa) bet kleuzet abaoe tregont vloaz etre ar yez lennegezh hag an hini komzet gand ar bobl* », ne vez ket lennet hirio ken ar helaouennoù brezoneg evel a vezent gwechall: gwechall ne helle ket lod euz ar vrezonegerien da nebeuta tremen heb kazetennoù pe embannadurioù en o yez, ha setu perag e veze moulet milieroù a skwerennoù anezo a-wechou. Hirio, eo embann brezoneg « *eun afer a volontezh* », evel a ziskoueze deom ervad eur studiadennoù on-eus embannet war niverenn 26 **Brud Nevez**.

Eun afer a volentez moarvad, med eun ezomm kerkoulz all evidom oll. Komz alfez a reer euz *kleñved ar brezoneg*. Gwir eo da nebeuta ar re o-devez paket anezañ o-devez poan oh en em zizober dioutañ, pe skrivagnerien pe lennerien e vijent, pe an eil hag egile war eun dro. Ha tremen heb ar brezoneg n'helljent ket. Ma'z eo kont evel-se, arabad evelato dizonjal eo ar brezoneg ar pez ez eo. Ha setu perag, e **Brud** koulz hag e **Brud Nevez**, o-deus atao an oll, a gav deom, klasket derhel d'eur yez hag a vije diazezet war « *an hini komzet gand ar bobl* » Kaer e vez tabutal a-wechou war ar pez ez eo « *yez ar bobl* », lavared a heller eo eur poent a ziazez a gont kalz, zoken ma'z eo disheñvel hirio planedenn eur gelaouenn vrezoneg diouz ar pez a hell beza bet gwechall.

Fae a zo bet greet warnom a-wechou, diwar a beb seurt digareziou, hag e reer c'hoaz eur wech an amzer. Ne ra forz. Evel m'ema breman, evel ma oa **Brud** a-raog, e kav deom eo **Brud Nevez** eur gelaouenn vrezoneg ha n'heller ket dianaoud. Kaoud a ra deom on-eus embannet dalhmad, hag er miziou tremenet marteze muioh evid biskoaz, darn euz ar skridou pouezusa a zo bet moulet en or yez. An traou-ze a skrivom n'eo ket evid sevel or hribenn nag evid bralla or hleier, tra ken nemed dre m'emaint da veza skrivet.

Gwelom nemetken peseurt skrivagnerien a gaver pennadou ganto e niverenn genta **Brud**: **Per Trepos, Ronan ar Moug, P.M. Mevel, Per Helias, Yeun ar Gow, Charlez ar Gall, L. Lok, Alan ar Berr, G. Bernier, an Dr. Tricoire, Tangi Prigent**... Neb a fellfe dezañ skriva istor lennegezh vrezoneg pe hini ar stourm evid ar yez er hart-kantved tremenet, n'hell ket chom heb derhel kont euz o anoioù dezo oll - hag euz eur bern re all o-deus kavet bod e diabarz **Brud** ha **Brud nevez** abaoe.

Er penn kenta, e oa sañset **Brud** da zond er-mêz peder gwech ar bloaz. A-benn ar fin, euz 1957 da 1976, eo 51 niverenn a zo bet embannet, da lavared eo tost da 3 ar bloaz. Daoust ma oa kalz tevoh peb niverenn d'ar houlz-se (er bloavezh kenta, e ree pep hini etre kant ha c'hweh-ugent pajenn, da skwer), eo ar skoillou a beb seurt hag an diêzterioù niveruz eo o-deus miret, eur mare zo bet, d'ober gwelloh. Abaoe c'hweh vloaz, he-deus ar gelaouenn kemeret eul lañs all, e 1977, dindan an ano a **Vrud Nevez**. Hag e miz kerzu ar bloaz-mañ, en em gavom da embann an 60ved niverenn euz ar rummad nevez, ha da veza kinniget 450 pajennad bennag a vrezoneg da lenn d'ol

lennerien, er bloaz-mañ. Ha n'on-eus ket komzet euz al leoriou ha leoriouigoù on-eus embannet ivez: prestig e teuy er-mêz eur «hatalog» klok euz on embannadurioù. Founnuz a-walh e vo da zouezi lod. Ar bloaz-mañ nemetken, eo 8 leor on-eus embannet ha tri pe bevar all a zo prest da zond er-mêz. N'eus ket tu da lavared e chomom da zelled ouz ar stered.

N'eo ket evid se ne rankje ket **Brud Nevez** beza gwelloh anavezet. N'eo ket evid se n'on-eus ket ezomm da gaoud muioh a lennerien hag a goumananterien. Ne fell ket deom randoni: med gwir eo he-deus ezomm ho kelaouenn vrezoneg da veza gwelloh anavezet e peb leh. Kalz a vrezonegerien ne hortozont nemedoh da rei **Brud Nevez** dezo d'anaoud. Ar houlz hag ar poent a zo d'ober plijadur d'an dud a anavezit: grit plijadur dezo en eur ginnig dezo reseo **Brud Nevez** beb miz, penn-da-benn ar bloaz. Ho stumm deoh-c'hwi e vo d'ober dezo ho kourhemennou a vloavezh mad!

Ha lennet ho-peus
oll beziou-c'hoari
Per Jakez Helias?

Mevel ar Gosker : 15 lur; 150g.

Tan ha ludu (Marheg an nevez-amzer; An douger-tan; Maro bihan Tin ar Halvez; Egile) : 15 lur; 150g.

An Isild a-heul : 30 lur; 350g.

Piou e-neus lazet an hini koz? : 8 lur; 40g.

Eun ti divestr; Pôtr ar henteliou; Kov Gwillou Vihan a ra trouz; Piou a bêo? : 10 lur; 90g.

War eun dachenn fobal; Eun den divemor : 5 lur; 90g.

Eur chupenn marhad-mad; Bouzar pe vud? : 10 lur; 95g.

Koll al leoriou

bet moulet e 1982 gand Brud Nevez

1. P.M. MEVEL, NAIG ROZMOR: Peziou-c'hoari nevez. IV. Krouidigez ar vaouez. An diskoulmer kudennou. An Enklask. Gwenn ha du.....10 lur
2. PER-JAKEZ HELIAS: Piou e-neus lazet an hini koz?.....5 lur
3. MIKAEL MADEG: Leor lesanoioù Leon. I. Gorre-Leon ha Bro-Chelgenn.....n'eus ket ken
4. PER TREPOS: Enquêtes sur le vocabulaire breton de la ferme..20 l.
5. AOTROU KERMARIA: Treuzviezadennoù. Rakskrid, diskoulmou ha geriadurig gand P.M.Mevel.....10 lur
6. JULES GROS: Le Trésor du breton parlé: Le langage figuré..20 lur
7. KRISTIAN BRISSON: Ar Reder-Mor.....20 lur
8. ALAN AN DIUZED: Lenaig.....15 lur

Leoriou

bet moulet gand embannerien all

9. BLEUN BRUG: Dilun, dimeurz, dimerher: rimadellou nevez..20 lur
10. KENVREURIEZ AR BREZONEG (Ar Skol dre lizer): Aviel Jezuz Krist.....63 lur
11. A. MERSER: Rimadellou (trede moulladur) (Ar Helenner)...20 lur
12. BUGALE SKOL PLONEZ-KINTIN: Ifig (Ar Helenner): albom bet savet gand ar vugale e brezoneg (gand eun droidigez en esperanto).....10 lur
13. BUGALE SKOL BLOUHINEG: Rouanez ar gorrigez: albom bet savet e brezoneg gand ar vugale (gand eun droidigez en Esperanto) (Ar Helenner).....10 lur
14. Studi: B. TANGUY: Dialectologie bretonne, eil levrenn..18 lur
15. Studi: LE DU-LE BERRE: Dictionnaire pratique français-breton, (IV. Dagorne - Espagnol).....18 lur

6

Bloavez mad e peb feson.

Evel ma'z eo Bro-Zaoz bro ar *Merry Christmas*, ez eo Breiz, a-dra-zur, bro ar *bloavez mad*. Ar hiz a oa, hag a zo bepred d'ober tro e gerentiaj, hag e amezeien, da zouhetai eur bloavez mad da bep hini. Da geñver an deiz kenta ar bloaz, ez eer a di da di, e vez prejou en oll familloù, ha pell a-walh e hell padoud an emgaviou-ze. Ar re ne vezont ket war-dro a skriver dezo: tud 'zo memez na skriver dezo nemed eur wech ar bloaz, eo da gas dezo an hetou a vloavez mad.

Ha bez' ez eo, kazimant, evel ma vije bet diwanet e Breiz eul lennegezh a vloavez mad. N'eus ket ezomm da glask kalz, evid kaoud rimadellou pobl, pe berniou barzonegoù bet savet gand a beb seurt skrivagnerien. N'eo ket moarvad eul lennegezh a oberennou divarvel. Med n'eo ket unan didalvoud, rag ijin o-deus lakaet ar vrezonegerien da rima ar bloavez mad. Ha c'hweg eo aliez an testennoù. Lod a ziskouezer enno kaoud fiziñs en amzer da zond. Savet 'z eus bet lod all avad da lakaad an nen da zouja d'e blaneden. War eun ton seder emma hiniennou, pa'z eo dihoarz unan all. Piou oar ha n'eo ket diouz e brederioù e-unan eo e heter eur bloavez mad d'ar re all?

N'eus forz, meur a stumm a zo d'henn ober. *Bloavez mad*, berr-ha-berr, hag aliesoh-aliesha moarvad. Med anavezet a-walh eo al lavar a glever - pe a glevet? - ar muia:

*Eur bloavez mad a zouhetan deoh,
Yehed ha prosperite,
Hag ar baradoz e fin ho puhez!*

Gwelloh e kav lod, e-leh hentcha ahanoh war-zu ar baradoz, cheñch ar werzenn ziweza, da ginnig deoh kerkent

Levenez a-hed ho puhez!
kuit da hortoz beza eet d'ar béd all...

7

En eun doare simpl hag eeun, e heller lavared d'eun tiad a-bez war eun dro:

*Bloavez mad da bep hini
Ha levezez leiz an ti!*

Rimadellou hirroh a zo avad, ha setu amañ unan euz ar re e-neus A. Merser kavet bod dezo en e leor rimadellou:

*Me zouet deoh eur bloavez mad,
Yehed kreñv ha boued war ar plad.
Kig bevin ha kig sall,
Bara gwiniz war an doal.
Kaol pomet en ho jardrin,
E-barz ho liorz pour hag irvin.
Karotez braz ha panez krenn
Evid ma vo mad ar zoubenn.*

Ha homañ c'hoaz:

*Koz ha yaouank, braz ha bihan,
Bloavez mad deoh a reketan:
Dillad didoull war ho tiouskoaz,
Labour didorr, yod silet poaz,
Kerh ha gwiniz 'leiz an irhier,
Krampouez lardet a-gorvajou,
Kig-ha-fars a-grabanajou,
Amann melen 'leiz ar ribot,
Da gousked beb a wele blod,
'Hed ar vuhez kalon laouen,
Ma vo eüruz ho planedenn!*

Hervez L.F. Sauvé, e oa troet ar Vretoned da zibuna hetou grotesques et souvent licencieux. Dipituz eo n'e-nije soñjet embann nemed an daou lavar-mañ:

*Bloavez mad, yehed ha prosperite
... Keit ha lost eur gweskle!*

*Bloavez mad d'ho lod,
Ha tiegez dilogod!*

En eun abadenn vrezoneg warlene, e oa bet klevet er memez mod unan goz euz Benah o houlen:

*Eur bloavez mad a zouetan deoh?
Eur bannah rom am-bo ganeoh?*

Ne gormzom ket amañ euz ar zoniou eginane: unan e-neus embannet Kervarker en e Varzaz Breiz, unan all a lenner, da skwer, en dastumadenn Kanenneu gwenedeg aveid ar vugale, (bet moulet gant Ar Helenner). Med lakaad ar bloavez mad war gan a reer ivez, ha diou pe deir zonenn a vez kanet evel-se gant Kanerien Sant-Vaze Montroulez. Etienn Rivoalan a zo ivez eun ton a vloavez mad gantañ ha gand e gomper G. Cadoudal, war ar bladenn m'emaint asamblez, o son ouz ar vombard hag ar biniou koz.

Med deuom d'ar barzonegou ah ouezom gand piou int bet savet. War gont an tregeriad Evnig Penn ar C'hoad, ema an daou-mañ da veza lakeet:

*Bloavez mad ha didrubuill,
Kalz a vleuniou da gutuill,
Bara da bep hini,
Ha yehed 'leiz an ti!*

*Da vraz ha da vihan,
Bloavez mad heb ehan,
Da baotr ha da baotrez,
Bloavez mad dibaouez,
Da yaouank ha da goz,
Bloavez mad deiz ha noz!*

Er memez stumm e-neus skrivet Kerlann:

*Bloavez mad, va zudou ker,
Ha levezez e peb kêr!
Da baotred ha merhed Breiz,
Traou war an doal, hag e-leiz!*

*Anduill, stripou ha kog moh
Ha fars-form 'leiz ho tivoh.*

*Boutailladou – heb tamm droug –
Da zigraza toull ho koug.*

Sañset e ver da ginnig a beb tra da heul eur bloavez mad, henn gwelet on-eus: yehed, kig, bara, kaol, dillad didoull, labour didorr, beb a wele blod...! Arabad e vije ivez ankounac'haad da gas e hetou da hini pe hini,

pe 've braz pe bihan, paotr pe blañ, koz pe yaouank!

Eun doare da veza gwelet mad nemetken? Pe ha ne vije ket kentoh teneridigez e-keñver an oll dud euz e anaoudegez hag e-keñver ar béd-oll?

Tro o-deus bet skrivagnerien all, anavezetoh, da skriva ivez evel-se barzonegou a vloavez mad. Anjela Duval, da skwer:

*Bloavez a joa, bloavez a spi,
E peb kalon hag e peb ti,
Bloavez a beoh hag a eurvad,
Evid peb bro ha peb Breizad!*

emezi war *Le Pays Breton*, e miz genver 1973. Hag en heh eilved leor a varzonegou, *Traoñ an dour*, e lenner c'hoaz:

*Ra vo ar chañs war hoh hent,
Ra vo ar berz war ho roud,
Ra hoarzo ouzoh peb beure,
Ra dommo d'ho kalon peb kreisteiz
Ra vo evidoh peb noz eun diskuiz.*

Er stumm-mañ e talher da renevezi giz an hetou e Breiz-izel, zoken ma n'eo ket ken pobleg ar barzonegou-mañ ha m'eo bet lod all.

Setu perag on-eus soñjet ober eun dibab e-touez ar skridoù on-oa anaoudegez anezo. Enno e vo kavet sur mad skwerioù euz spered ar Vretoned, koulz er ganaouenn a gan *Lomig Doniou*, er barzonegou savet 20 vloaz 'zo dija gand *Per-Jakez Helias*, hag er re nevez rimet mistr gand *Charlez ar Gall*. Ha c'hoaz, darn, evel *Job Seite* pe *Loeiz Fave*, hag a skriv beb bloaz tost da vad o barzoneg a vloavez mad, n'on-eus an tu d'embann nemed unan ganto!

Med marteze eh anavezit-c'hwi doareoù all da ginnig ar bloavez mad? Pe barzonegou all? Bezit ar vadelez d'o rei deom da anaoud, hag e vo tu da astenn an tammig studi-mañ...

Trugarez deoh en a-raog! Ha... bloavez mad!

J.S.

Hetou nevez

ha rimadelloù arnevez

**kinniget pillou-dibillou
d'ar mammou ha tadou-koz
d'an tadou ha mammou-koz
d'o bugaligoù ha ribitaillou.**

Ar biz-meud e-barz ar bleud
Ar biz-yod e-barz ar pod
Ar biz braz eo lost ar haz
Biz ar bizou a ro pokou
d'ar biz bihan kousket dindan.

Hillig hillig...
Eul logodenn war va fenn
Eur haz-koad war va zroad
Beg ar yar war va garr
Lost ar hi war va fri
Hi hi hi!

Eul logodenn o teski lenn.
Ar « ouistiti » à lar dezi:
Kemer eur vi 'weli i
Kemer ludu 'weli an u
Kemer kolo 'weli an o
Hopala! kollet an a
Patatra!

Me ha te 'barz ar gwele
Te ha me daou bennwele
Te a-grog me a ziskrog
Chouri choura
Diwall roga
Ar pijama!

Me ya dillo gand ar velo
Me ya buan gand ar harr-tan
Me a nij gand ar harr-nij;
Pa n'eus tamm, me a lamm
Troadig-kamm!

Pa dreuzi ar ru, sell e peb tu.
Ar goulou zo ru(z): chom en da du;
Ar goulou zo glaz: me ra eur paz
... hag eur paz all
Me n'on ket dall!

Ar vombard d'ar hi lard
An delenn d'ar haz gwenn
Ar biniou da forz piou
Taboulin ha talabao
Jibidi ha termaji
E-barz an ti!

E noz ar pellgent e bleñch al lann,
Dindan ar stered hag al loar-gann,
Al laouenanig 'bok d'ar pintig
Kement ha Yannig d'e garedig.

Nedeleg zo eur stivell,
Eun andon didermen
O skuilla levez e kibell
An amzeriou o tremen. (1)

Pa gouez an « eteo-Nedeleg » e glaou,
Diwar plouz melen e graou,
Eur hrouadurig 'halv an êlez
Da skuilla levez war beb tiegez.

Mar deo hir an hient,
Teñval-du ar goabrenn,
Kerz pôtr! dalh da vond, sav da benn!
An oabl adarre vo seder
Pa glevi er pellder
Kleier ar Pellgent.

Daoust d'an êlez ha d'ar Zent,
Hirio evel deh ha kent
Ha pa vefe noz ar Pellgent,
Ar paour 'rank starda e zent.

E-pad ar bloaz nevez, penn-da-benn,
Vo laouen ho kalon hag ho penn
Evel eul logodenn 'touez ar foenn;
Hogen,
Arabad d'ho pragou chòm dibrenn,
Klozit mad peb tra en diretenn!

Bloavez mad a-berz ar vugale,
Da gement hini a ouio dizale
Pa erruo ar bloaz nevez,
Skuilla pemp realad levez
Hag hada eun tammig koantiri
Etre an diri ha dor zigor e di. (2)

Koz ha yaouank, gwitibunan,
Bloavez mad deoh a zouhetan:
Dillad didoull war ho tiousoaz,
Labour didorr, lipig d'ho kaz,
E-kerz ho puhez kalon laouen,
Ha pa vo maro ar houlaouenn,
Da beb hini e gurunenn.

'Ma Nedeleg warnom
Ar Bloaz Nevez o tond
Boul ar Bed a dro ront
Fañch-ar-Peul 'ya da heul.

A-barz pell e vo Nedeleg warnom
Ar Bloaz Nevez ivez a zo o tond
Boul ar Bed am-eus aon ne dro ket ront
Med derhel a ra memestra da vond.

Goude ar c'hwez-deliou
'Tigouez ar Pellgenchou;
Ar Bloaz Nevez ivez kenkoulez all
Heb na vefe netra da damall
Na da Zoue na d'an dud
Na kennebeud d'an Diaoul-Mud.

P'eo deuet gouei Sant-Jelvestr
An orolaj eo ar vestrez;
Heb evez ouz anken Mab-den
E sko dibreder ar momeder.
D'hanternoz, heb soursial ouz den,
Diou nadoz yud ha yen
A laso diremed
Dirag daoulagad ar Bed
Al lagadenn ' dalvezas a oll-viskoaz
Da skoulma devez deh ouz hini warhoaz.

Charlez ar Gall.

(1) ha (2): bet moulet e 1979 hag e 1981 da geñver Nedeleg / Bloaz-nevez war
Brest-Espoir, kelaouenn vizieg Ti-Kêr Brest.

Doni, Done, Setu noz ar Bloaz Nevez...

(Oh erruoud e toull an nor)

Doni, done,
Setu noz ar Bloaz Nevez.
Ma'z oh kontant, ni a gano,
Ha ma n'oh ket ni 'dihano.
Doni, done, setu noz ar Bloaz Nevez.

Eur bloavez mad a zouetan deoh, eur bloavez mad digand Doue,
Avañtur vad d'ar re yaouank, d'ar re goz prosperite. (2 wech)
Ar baradoz ' fin ho puhez mar bez bolontez Doue.
Doni, done...

Ni a zo paour-kêz kanerien, 'zo deut henoz da bourmen
'Vid dalhen en amzer-vremañ, 'vel oa gwechall, al lezenn.
Ma n'eo ket evid feneanti, bale, pourmen pe eva,
'Mañ deuet ar paour-kêz kanerien henoz d'ho saludi.

Ha ni a zo deuet d'ho kweled, evel ma yee ar bastored,
Da weled ar mabig Jezuz, ganet 'n eur hraou magoret (1)
Doni, done...

Anoñset oa digand an El, oa ganet gwir vab Doue
'Barz ar gêr a Vetelem, Roue an oll Rouanez.
Ar Mabig Jezuz a zo ganet 'barz ar gêr a Vetelem
Etre eun ejenn hag eun azen war eun dornad plouz ha foenn.

Da geñver an nozvez henoz 'komañs Jezuz da skuill e wad
Evid rei dim bihan ha braz asamblez on derou mad.
Doni, done...

Deuit 'ta da zigori an nor, pe deuit pront d'on refuzi
Kalz re vraz 'vefe an imor chom re bell d'ho importuni.
Eskuz a houlennom ganeoh, o mar mom ho ofañset (2)
En or pedenn, en or orezon, petramant en ho kousked.

(An nor digoret, ar ganerien a ya en ti hag a gendath da gana)

O! kambr ar Zent hag an Elez, kambr an Itron Varia
Ha gras dim d'ober kemend-all 'benn an deiz-mañ 'benn ar bloaz.
Doni, done...

(1) *mogeriet* (?)
(2) *mom: on-eus*

Hervez Lomig Donniou, Rostren, 1968.

Bloavez mad

Deoh oll, mignoned, eur wech all adarre
E teuan da ginnig, rag deuet eo ar mare
Va hetou ar gwella: Da bep hini yehed
Bemdez hag e peb ti, peoh hag eürusted!
Ra vo e peb kalon, hadet stank karantez
Evid or bro ken kaer, ma vo gwriziou nevez
Niveruz ha kreñvoh, da zikour ma chomo
Hag or feiz birvidig, hag or brezoneg beo
'Vid an oll Vretoned euz pevar horn ar béd
Ra vo gand Doue va hetou sevenet.
Ra vo, en unvaniez, bugale Vreiz bodet
Evid m'o-do bara en o bro, heb tehed
Ma hello pep hini displega e ziviz
Gand lealded, fiziañs, gwirionez ha frankiz
Oll, gand bolontez vad, unanet ha kreñvoh
Da zevel en or bro buhez kalz eürusoh
Dreist ar rannvro vrudet, deoh oll, renerien
Me reket d'ho skridou hekleo ha lennerien
Euz or bro Breiz-Izel, war vor ha war zouar
Deoh, kenvroiz ker, bloavez mad ha dispar!

Kereour koz Kastell-Paol.

Bloavez mad e peb keñver

O deiz kenta a viz genver!
Bloavez mad deoh e peb keñver
Digand Doue! – Hervez ho c'hoant,
'Pez a zo mad! Pez a zo koant!

Ar baradoz... diwezatoh!
Goude eun dro... er Purgator!
'Vid kaoud eun ene gwenn ha glan,
Red mad e vo devi tan!

Evid bremañ, pep hini, sur,
Koz pe yaouank, diod pe fur
A vag hetou a-dreñv e dal,
Mall gantañ da dizoud e bal.

Ar paotr bihan: gwenneienigou
Da brena kouignou, madigou,
Hag a-hend-all, karga e-barz
Eur hov marlonk, peziou tamm fars.

An dimezellig gand he zaout
A huñvre: « Me a garfe kaoud
Eur vantell, hag ouspenn – ya feiz!
Dillad nevez ha loerou seiz.

Ar bennherez a zell a-gorn
Ouz eur paotr yaouank euz he horn;
Eur blijadur 'vefe eviti
Paka hemañ da zimezi.

Ar medisin a gav atao
A ya yehed an dud re vrao!
Eveldom e-neus-eñ eur yalh.
Eno, eno emañ an dalh!

Ar person koz a wel gand ... keuz
Pikou du war ar boued. – Gwall reuz!
Ya... eur friad er patatez,
Kouezet c'hoaz diouz fri ar vatez!

Laouen e vefe kavoud an tu
Da gaoud eur pred heb ar « pebr, du ».
Daoust d'e bedennou, bez e zo
Butun er plad!... hag a vezo!

O karabasenn didruez,
Oh ampoezoni eur vuhez!
C'hwezit ho fri beteg ar strad...
Aotrou person: eur bloavez mad!

Ar sklêrded a vank d'an hini dall
Ar yehed a ra diouer d'eun all,
Re bonner 'vez kavet ar beh
Gand an oll dud hag e peb leh.

Ne vern! Eur bloavez mad d'an oll!
Lakom boutailloù war an daol,
Chistr mad da genta, ha gwin flour:
Hirio n'eo ket devez an dour!

Charlez Kalenneg.

Plistin.

Hetou nevez war eun danvez koz

Digorit dor, digorit din!
Eur zamm a hetou zo ganin,
Ho spi, ho kortoz hag ho mall
Am-eus em zah e-touez traou all.

Netra re, med netra re nebeud,
Draillet munud d'an tan ar heuneud.
Ra jomo pep hini 'n e blas
Hag e vo loñch evid ar chas.
Pep hini hervez e halloud
Diwallet vo mad-tre ar zaout.
Na re da laez na re d'an traoñ.
Ra vo ar marh dirag ar harr,
Pep hini a gavo e bar.
Netra re vad, netra re fall,
Bara zegal ha freskenn zall.
Netra re galed na re wag
Ar zeh koulz hag an druz a vag.
D'an treid-etre na hir na berr,
Pep hini en e voutou-ler.
Na re hleb amzer na re graz,
Dond a ra heol war-lerh glao braz.
Bloavez mad evid ar gwez frouez
Ha mad ivez d'al loened gouez.
Penaoz? Ar bloavez mad d'ar bleiz?

Ya, feiz!

Daonet ebed hirio an deiz,
Hag oll ni yelo d'ar Baradoz
Ken eeun ha ma ya neud en nadoz.

Digorit frank, ar wech-mañ c'hoaz,
D'ar paotr a gan ar helou bloaz.

Per-Jakez Helias.

Eur zahad hetou

Eur bloavez mad da dud an ti,
Nebeud a veh, kalz a zudi,
Labour da gaoud boued da zebri,
Soubenn zruz leun ar skudilli,
Ha kaoud ivez lodenn ar hi,
Lodenn ar hreñch, ar marchosi,
Heb kas kuit kaz na boued e fri,
To ti pa ri pe ne ra ti,
Kleved a ri?

Eur bloavez mad d'an oll girri
Ha d'ar stlejer, ar penefi
A gav paz hardiz da derri
Heb goulenn mond da zisglavi.
Eur bloavez mad d'ar seiz Mari,
Keveleg, Drezen pe Dangi
O-deus o gwazed er bigi.
To pa ri ti pe ne ra ti,
Kleved a ri?

Yann Baour, ra zeuio d'aouri
Gand eun hanter euz e avi.
Karantez er hreiz o virvi
'Vel an had peget en irvi.
darempred etre karidi
'Vel etre gwenn ha melen vi
Dindan ar gloenn oh azvi.
To pa ri ti pe ne ra ti,
Kleved a ri?

Hag ar Baradoz da echui.

Per-Jakez Helias.

An Aviel e brezoneg

A-dra-zur eo eun darvoud a-bouez braz e vije bet embannet eun droidigez all euz **Aviel Jezuz-Krist** en or yez, evel m'ema **Kenveureziez ar Brezoneg** e paouez ober gand skoazell **Ar Skol dre Lizer** hag hini **Abati Landevenneg** (1). Dreist-oll pa zeblant al labour-mañ beza bet greet a-zoare hag aketuz, Ouspenn-ze, eo bet embannet dindan stumm eul leor godell c'hweg, ez da zornata, ez da lenn, moulet brao, gand poltrejou kalvanou e-barz.

A-bell 'zo e troer an Aviel hag ar Bibl e brezoneg, hag istor an troidigeziou-ze e-neus bet tu da gonta an Tad Grégoire, war gelaouenn abati Landevenneg, **Pax** (2). An hini genta a oa bet hini ar Gonideg, embannet gantañ en Angoulême, e 1827: **Testamant nevez Hon Aotrou Jezuz-Krist**. Med ne oe embannet e **Destamant koz** nemed e 1866, eur wech adwelet gand Troude ha Milin. Ha c'hoaz, dre ma vanke ouz ar skrid an notennou a rank beza savet hervez an liiz, ne oa ket bet lakeet e gweez.

Hirio an deiz, ez eus e gwinonez meur a skipaill o labourad war droidigez vrezoneg ar Bibl. Maodez Glanndour, gand harp beleien all euz Bro-Dreger, eo dija an eil gwech dezañ da lakaad moulla **Ar Pevar Aviel**, hag ouspenn e-neus embannet **Liziri an Ebestel, ar Salmou ha Levri Izaia** (3).

Diouz o zu, eo krog an aotrounez Per ar Gall ha Job Lec'hvien d'embann le-vrennou kenta ar Bibl: diou o-deus moulet dija, dindan eur golo e hou, **Al Lezenn** hag **Ar Brofeted kentañ** (4). Red eo menegi c'hoaz al labour a ra ar wenedouinen, daoust ma n'o-deus beteg-henn embannet nemed lodennou 'zo euz ar Skritur Sakr, da veza implijet e-kerz an ofisou.

Perag sevel troidigeziou euz an Aviel? Hag evid piou? Hag a gement-se a bouez eo tri ar Bibl e brezoneg en amzer-vremañ? Maodez Glanndour a zoñj gantañ krak-ha-krenn ez eo, hag on-eus « aze eur fed euz ar pouezusa evid ar yez en amzer-vremañ. » (5). War-ze, ha war veur a boent all, on-eus c'hoanteet gouzoud santimant unan euz ar re e-neus lakeet e brezoneg **Aviel Jezuz-Krist** an aotrou Chaloni **Elard**, aluzenner e Karmel ar Releg, unan euz kenlabourenen an aotrou 'n Eskob V. Fave. Dedennet e vo sur-mad lennenen Vrud Nevez o lenn e responchou.

Med ma'z eus bet greet abaoe daou hant vloaz, ha ma reer c'hoaz en deiz a hirio, kement a strivou d'embann ar Skritur Sakr e brezoneg, ne gaver ket da lenn en or yez kemend-all a skridoù pe eneb ar relijion pe diskredig en he heñver. Pe neuze n'int ket anavezet. Soñjet on-eus ne vije ket displejet ol lennerien eta o weled penaoz eo bet rentet e brezoneg gant **Erwan Berthou** eur skrid diwar bluenn ar skrivagner galleg **Bernadin de Saint-Pierre, Ostaleri Surat**. Eur skrid eo « war vadelez kement relijion a zo. » Embannet eo bet gant E. Berthou e-pad ar brezel all, e 1916, dindan stumm eul leorig bihan a 18 pajenn. D'ar houlz-se e ranked moarvad kaoud eun tamm hardisegez bennag d'embann seurt pennadoù e brezoneg.

J.S.

(1) *Goulenn ar leor digand Abati Landevenneg pe digand Brud Nevez evid 63 lur.*

(2) *E 1971, 1975 ha 1976.*

(3) *Gand Al Liamm eo bet embannet ar pevar leor.*

(4) *War ano eun ti-embann savet esprez-kaer evid se eo e lakont al levrennoù-ze da zond er-mêz: An Tour-tan (22, Kergrist-Moelou).*

(5) *War Al Liamm, niv. 208, p. 360.*

Ar Helou mad e brezoneg an dud.

– Emaoh o paouez trei hag oh embann Aviel Jezuz-Krist e brezoneg. Perag?

Ar Chaloni Elard: Kavoud a ra din eo an Aviel on-eus embannet eul labour a dalvoudegez evid an Iliz hag evid Breiz-Izel. N'ouzon ket ped levr a vo gwerzet anezañ. Med e-pad pell amzer e vo kavet en tiegeziou a gemero ar boan d'e brena, hag ivez e tiez al levriou.

Breiziz o-dezo evel-se eul levr, unan muioh, skrivet en eur brezoneg flour, hervez ar gelaouenn **Kemper ha Leon** (p. 445) hag a vo, emichañs, c'hweg da galon ar Vretoned. Ni, avad, a oar mad ez eus c'hoaz gwellaenn da zigas ennañ. Med n'eo ket hepken, na dreist-oll, evid kement-se eo on-eus troet an Aviel e brezoneg, med evid ma silo drezañ e spered ha kalon an dud **Kelou mad** or **Zalver**. Ha ma'z a an traou evel-se, ha fiziañs braz on-eus ez aint, e vezim digollet mad euz or poan.

Gwell a ze ivez ma hell ol labour kenziskouez, d'an dud, ha dreist-oll d'ar re a zo ouz or gouarn. n'eo ket maro ha n'emaint ket zoken war o zremenvan, nag or yez nag or zevenadur keltieg!

Braz oa or fiziañs en eur ober al labour-mañ rag mond a ree mad gant ol labour a eskob hag a veleg: rei da anaoud Jezuz Krist; n'oa nemed eun nevezenn savet war or prederiou pemdezieg.

– Penaoz ho-peus-c'hwï greet eur seurt labour? Diwar peseurt yez?

Ez eo kregi gant eul labour, kas anezañ da benn a zo diêsoh. Eul labour hir eo bet on hini ha poaniuz a-walh a-wechou. Bez' e heller e ranna e diou lodenn:

Al lodenn genta:

P'e-noa ar Sened-Meur roet da anaoud e hellfed lavared an overenn ha lida ar zakramanchou e yezou ar vro, e-neus **Kenveuriez ar brezoneg** kroget gant al labour a oa da veza greet da genta: rei d'ar parrezioù kement a oa red evid kement-se: ar peder bedenn eukaristel; al lennadennou euz an Aviel, euz Lizeri hag Oberou an Ebestel, euz an Testamant koz, dreist-oll euz ar Salmou. Hag e krogas gant al labour an aotrou Per-Yann Nedeleg, sikouret gant an aotrou 'n Eskob Fave. Ha da viz kerzu 1969 e teuas euz a zindan ar wask, ar haier kenta embannet gant **Kenveuriez ar Brezoneg** a vo ano anezi hirroh, eun tammig pelloh.

Moulet e oe ganto evel-se 14 kaier. Ha pa varvas Per-Yann Nedeleg edo ganto war ar stern ar pemzegved kaier. Hemañ goude-ze hag ivez ar haier c'hweteg a deuas er-mêz diêz a-walh.

Azaleg an niverenn 17 ez eas adarre al labour didroidell war a-raog. An aotrou 'n Eskob Fave sikouret ganin, a gemeras ar garg euz an troidigeziou, a veze goude-ze fiziet e **Skol an Aod** e Gwiseni. Ar garg da veilla war gement-se a oe kemeret gant an aotrou Job Seite; 33 haier a oe evel-se embannet gantañ, ar henta a deuas er-mêz da viz meurzu 1971 hag an diweza, an niverenn 50, da viz mae 1979. Eiz vloaz labour eta.

An eil lodenn:

Gellet on-ije, goude al labour-ze, chom a-zav. Gwelloh on-eus kavet kenderher. Perag chom heb embann an Aviel penn-da-benn? Kalz anezañ a oa bet embannet dija, n'oa nemed o dastum da ober, rei dezo eun tamm peurlipad ha trei kement a ree diouer deom c'hoaz. Setu ar pezh on-eus greet. Ha

bremañ emañ oh ober ar memez labour gand Lizer an Abostol Sant Paol d'ar Romaned: danvez ar haier 51.

– **Diwar peseurt yez eo bet savet?**

Pell a oa ez oam kustum euz an Aviel, abaoe amzer or hloerdi, studiet oa bet ganeom muioh e latin eged e gresianeg. An Aviel hag ar Bibl a zo bet hed ar wech al levr ar muia gwerzet a zo er béd, ar best-seller. Troet eo bet e koulz lavared pep hini euz ar yezou a vez komzet dre ar béd. On troidigez deom n'oa nemed unan muioh. Evid dond a-benn euz ol labour, ni a veze ganeom, perag henn nah? an testennoù e latin, e gresianeg, e saozneg, e galleg, e brezoneg. Ha dre ma'z eem e tibabem an troiou-lavar hag a yee ar gwella, gand ar yez da genta, kuzuliet ma vezem aliez war ar gresianeg dreist-oll gand an aotrou Morvannou, kelenner er skol-veur e Brest, ha war ar Skritur Sakr gand an aotrou P. Guichoux, d'ar mare person Kastell-Paol ha bet kelenner war ar Skritur Sakr e kloerdi braz Kemper.

Evid skriva on Aviel n'on-eus ket trehet or gouenn. Klasket on-eus implij ar brezoneg a vez e-touez an dud hag a zo ivez brezoneg ar skrivagnerien evel an aotrou A. Caer, person Gwinevez, an aotrou A. Ugen, an aotrou A. Guillou, an aotrou A. Perrot... hag all.

– **Petra eo Kenvreuriez ar Brezoneg a oa o ren al labour? Ha niveruz emañ a-barz ar gomision karget euz an droidigez? Petra all e-neus greet, pe a ra ar Genvreuriez?**

Eun istor hir ha talvouduz eo, hag a vo red skriva penn-da-benn eur poent a deuo.

Savet eo bet e Kloerdi Kemper er bloavez 1894 gand c'hweh kloareg yaouank, en o zouez an aotrou Bernard Cozanet deuet da veza diwezatoh kelenner war ar saozneg e skolaj Kastell-Paol (Ar haier niverenn 44 euz **Kenvreuriez ar Brezoneg** e-neus embannet an droidigez e-noa greet e gwerziou brezoneg euz al levr saozneg « Enoch Arden ». Sevel a rejont ar genvreuriez-se evid sikour ar gloareged da anaoud gweloh ar yez a vije diwezatoh peurliesia yez o frezegennou. Divizoud a rejont skriva hervez reolennou ar Gonideg. E-touez ar re a zo bet e penn ar genvreuriez e kavom, er bloavez 1901-1902 Yann-Vari Perrot, maro evel a ouzor person e Skrignag d'an 12 a viz kerzu 1943. Goude ar brezel 14-18, ar Genvreuriez hag a oa bet morgousket eur pennad, a gavas eul lañs nevez, roet dezi gand kloareged deuet euz ar brezel, en o fenn J.F. Le Goff, maro person Plouneour-Tréz, ha gantañ F. Guivarc'h (Saik Santeg), Paol Guillou, Loiz ar Menn, Laorañs Bleuven, Fañch Mevelleg, V. Fave, ampart pep hini anezo war ar brezoneg.

Ar genvreuriez a gendalhas gand he labour bleinet gand kloareged evel F. Falhun, Youenn Kerouedan, Bernard Merdy hag all, atao evid sikour ar gloareged. Ar re-mañ a veze rannet neuze e teir lodenn, da uhella an Akademie, izelloh ar skol grenn ha da izella skol ar re zizesk. Ar re-mañ a zeue da veza niverusoh-niverusa dre ma kreske niver ar re n'o-doa ket desket ar brezoneg en o yaouankiz.

P.Y. Nedeleg e-neus kendalhet gand al labour ha ni eo a ra bremañ war-dro ar genvreuriez da hortoz ma hellim adarre beza dizamm gant kloareged yaouank!

– **Ha kaoud a ra deoh e oa ezomm da zavel eun droidigez all euz an Aviel, pa oa bet dija embannet unan gand Maodez Glandour eun nebeud bloaveziou 'zo?**

Ya, a respontan dioustu heb mar ebed. E peb yez koulz lavared, e galleg da skwer, e vez greet kalz troidigeziou eun tammig disheñvel an eil diouz eben. Hini anezo n'eo a re. Perag ne vefe ket ivez e brezoneg meur a aviel troet e brezoneg? Da beb prener goude-ze da ober e zibab.

– **Peseurt dibabou ho-peus greet, c'hwit? E-keñver yez? Hag e-keñver an destenn heh-unan? Seblantoud a rit aliez beza bet dibabet eur stumm tostoh euz ar yez-pobl hag euz ar yez komzet, evid pezh a zell ouz an anoiolezh hag an anoio-tud, da skwer, mez ivez evid gerioù evel « justis, » e-keñver « reizter », « gloar » e-leh « klod », « treuzfermi » e-leh « treuz-neuzia », hag all, hag all...**

Respontet am-eus dija war ar poent-se. Klasket on-eus atao beza tost d'ar yez komzet. Implijet on-eus meur a her hag a zo ganto eun tamm blaz ar galleg, evel *just*, an dud *just*, *justis*: *justis Doue*, gerioù hag a zo bet kalz implijet en or raog, hag a zo anavezet gand an oll, gerioù a gaver er hatekiz koz, e buhez ar Zent. Perag ne vefent ket en o'ez, gwisket ma'z int e brezoneg abaoe keid amzer?

Meur a gudenn a zo bet; n'oa ket êz trei: *Abominationem desolationis*, eun *heugadenn spontuz* (Mk 13/14); *ut credatis quia ego sum*: evid ma kredoh ez on *Me* (Yn. 13/19). D'al lenner da varn.

Med eskopti Kemper a zo braz ha disheñvel euz an eil penn d'egile. Eur ger, eun dro-lavar anavezet mad amañ a hell beza dianavezet a-hont. Red oa deom beza war evez war ar poent-se ha chom heb lavared re vuan: ar ger-mañ-ger n'eo ket anavezet. Ma n'eo ket anavezet en eur horn bro e hell beza anavezet mad en eur horn all.

- Ne gav ket deoh eo, a-benn ar fin, disheñvel a-walh ho troidigez diouz hini Maodez Glanndour, mez ivez deuz an troidigeziou all bet savet a-raog, hag ez eus eun diforh braz etrezo? Hag eo eun afer a yez hepken, pe ivez eun doare da gompren an Aviel? Peseurt dibabou ho-peus greef e-keñver an destenn heh-unan?

Disheñvel eo a-dra-zur diouz ar re all. Anez ne dale ket ar boan deom henn ober. N'on-eus ket kroget gand ol labour evid ober heñvel ouz ar re all, med gand ar zoñj da zigas gwellaenn en testennoù war boent pe boent. Ha greet on-eus? On Aviel deom eo Aviel Jezuz Krist, evel m'eo aviel Jezuz Krist an troidigeziou greet gand re all en on raog. Gwisket eo ganeom disheñvel hag afez disheñvel-braz, med netra ken.

Dre ma'z eñ al labour ganeom war a-raog e kave deom ez oa diou lodenn en ol labour. Eul lodenn, al lodenn vrasa, a veze êz da lakaad e brezoneg; ha neuze, e kave deom e veze red ha saour gand or brezoneg, êz da gompren evid al lenner. Eul lodenn all a oa, berroh, sur eo, hag el lodenn-ze ez om bet skoillet meur a wech; henn lavaret am-eus dija. Ha neuze eo bet red deom klask ennom on-unan, er pez a anavezem euz or yez, pe e skridou ar re all. Pep hini ahanom a ginnige an dro-lavar e-noa kavet ha goude-ze e veze dibabet an hini a gavem ar wella hervez ar yez: skriva an Aviel e brezoneg ar gwella ma hellem, ha pa ne ve nemed drê zoujañs evid or yez. Goud a ouiem ez oa ivez eun afer a Aviel. Klasket on-eus kompren gwelloc'h an destenn, mond enni donnoh ha pelloc'h ha dre-ze rei dezi muioc'h a nerz evid sklêrijenna an dud, heb dizoñjal morse ar pez a lavare ar Romaned: *Traductor, traditor; trei, treiz!* Rekouret om bet war gement-se gand or mignoned, on-eus komzet anezo.

- En e raglavar, e skriv just a-walh an Tad Mark ez eus bet kavet henchou nevez abaoe tregont pe zaou-ugent vloaz hag a ro sklêrijenn da gompren gwelloc'h an Aviel. Penaoz ho-peus dalhet kont euz an henchou nevez-se? Ha n'eo ket se beza modern?

Gwir eo ar pez a lavar an Tad Mark (Aviel p. 16): *henchou nevez a zo bet kavet abaoe tregont pe zaou-ugent vloaz a zo evid kompren an Aviel*. Ne vez ket a-dra-zur displeget deom krouidigez ar béd evel ma veze lavaret hanterkant vloaz a zo, med an destenn a jom heñvel, atao e vez lavaret ha gwir eo: *er penn kenta Doue a grouas an neñv hag an douar* (Gen. 1...). *Er penn kenta edo ar Gompz* (Yn. 1/1...). Labour an troer eo skriva e yez ar vro an destenn a zo an dosta d'an hini gosa, lakom d'ar gresianeg, war evez atao da jom heb fazia.

Med eul labour all a zo da ober goude-ze, ken talvouduz hag ar henta.

Labour an hini e-neus da zisplega, da gelenn an Aviel. Hag amañ dreist-oll e teu da wir komzou an Tad Mark: *henchou nevez a zo*. Evid chom war an hent mad e vo red lenn, studia, ar pez a vez skrivet, prederja warno goude-ze, ober an dibab etre ar greun hag ar pell. N'eo ket êz atao ha skañv e tle beza or skouarn da zelaou petra lavar deom an Iliz war boent pe boent.

- N'ho-peus ket kavet re a skoillou nag a ziesteriou? Pegeid eo bet padet deoh ober al labour? Hag e soñj emañ bremañ da zerhel gand lodennoù all euz ar Bibl?

Skoillou ha diesteriou on-eus kavet, evel m'o-doa kavet ar re o-doa troet an Aviel e brezoneg en on raog. Bremaig em-eus komzet euz daou anezo. Penaoz ivez trei ar pez a lavar Sant Vaze 19/9: *nisi ob fornicationem*. Respont a rin da gement-se war-lerh.

Dibabou on-eus bet da ober ha n'oant ket êz atao:

- 1- dre *te* om eet atao koulz lavared: Lk. 18/39: *Mab David bez truez ouzom*.
- 2- ar ger *Kompz*, on-eus skrivet peurliesia gand K/G braz, da skwer Yn 1/1: *Er penn kenta edo ar Gompz (Jezuz ar Gompz)*.
- 3- E-leh skriva *ober pinijenn*, on-eus skrivet: *cheñch buhez*, evel Lk 24/47: *Hag e tle ar cheñch buhez beza prezeget...*
- 4- Evid *an nebeud a feiz*, on-eus lavaret: *al laosk m'eo ho feiz*. Mz 17/20: *Abalamour ma'z oh laosk en ho feiz...*
- 5- Evid nah stard eun dra bennag on-eus skrivet a-wechou: *Nann, me 'lavar deoh*. Mk 14/25: *Nann, ne walhi biken din va zveid*. Yn 13/8.
- 6- Er frazennoù on-eus peurliesia lakeet ar verb da genta hag ar ger rener goude: Yn 14/8: *Neuze e lavaras Filip dezañ, e-leh: Neuze Filip a lavaras...*
- 7- Ar malloziou war ar Farizianed on-eus troet evel-henn: *Gwaz a ze Lk 6/24* hag all. (*Alas e saozneg, hélas*)
- 8- Evid *tu es petrus* on-eus lavaret: *te 'vo Kefa da ano, da lavared eo « Roh »*.
- 9- Ar gêr *med*, mez on-eus troet afez dre ar ger *avad*. Yn 6/63: *Bez' ez eus avad en ho touez ha...*
- 10- *Maro or Zalver* troet ganeom evel-henn: *Jezuz a rentas e spered*. N'eo ket bet dilammet digantañ.
- 11- *Digouvria = congédier; an den nevez = nouveau marié*. Beza e dalh an *droug-spered = possédé* (Lk 8/28)

- Komzom eun tamm bennag euz an Aviel e-unan. Petra eo, a-benn ar fin? An Tad Mark c'hoaz eo a skriv eo « ken fonnuz danvez an Aviel-ze ma ne zeuer ket a-benn abaoe daou vil bloaz, da zuna anezañ an oll dalvoudigez a zo ennañ. » Ha ken gwir-ze eo?

An Aviel, e gresianeg *Euaggelion*, eo ar *Helou mad*. Peseurt Kelou Mad? Ar Helou Mad-mañ, n'eo ket, da genta, eun dra bennag lavaret deom, med eun den hag a oa Doue, ar Hrist (Den ha Doue asamblez), deuet da lavared d'añ dud e oa eñ Mab da Zoue, ha Doue a oa eun tad hag a garie an dud. Ar Helou Mad da genta eo buhez ar Hrist penn-da-benn, kement e-neus greet, kement e-neus lavaret.

Ar Helou Mad-ze a zo bet dastumet e pevar levr a vez greet anezo ar pevar levr Aviel: avielou Sant Vaze, Sant Mark, Sant Lukaz ha Sant Yann. An Tad Mark a gont deom eo bet savet al levriou-ze diwar ar pez a veze lavaret ha kredet gand ar gristenien genta diwar-benn buhez ha kenteliou Jezuz a Nazared

Al levriou-ze eo Komz Doue, ha Doue e-neus atao eun dra bennag da lavared deom. Med an Aviel a hell beza lennet e diou feson. Da genta eul lennadenn greet buanig a-walh, peadra da houzoud petra e-neus greet ha lavaret or Zalver. Niveruz eo ar re a ra eul lennadenn evel-se. Med bez' e heller ivez ober al lennadenn en eun doare all, en eur gemered an amzer da laosker an Aviel da zila ennom. N'eo ket hepken lenn eo a vez greet neuze, med pedi an Aviel. Neuze e teu an den da helloud suna tamm-ha-tamm pinvidigeziou Komz Doue. Red eo beza heñvel ouz Samuel dirag Doue: *Komzit Aotrou Doue, ho servicher a zo ouz ho selaou.*

- Peseurt talvoudegez e-neus an Aviel evid an dud a hirio?

Doue a zalh d'e her. Eur Mesiaz a oa bet prometet. Ar Brofeted aliez o-deus degaset kement-se da zoñj da bobl Izrael. Or Zalver o tond war an douar oa ar respont a hortoze an dud. Eur sklêrijenn e oe evito, eur steredenn o para e-kreiz an deñvalijenn. Kalz a yeas d'e heul rag evel a lavare Sant Per gantañ edo komzou ar vuhez peurbaduz.

Peseurt talvoudegez evidom-ni, evid tud euz on amzer? An dud, heb ar Helou Mad, a zo evel kollet war an douar, ne ouzont nag a beleh e teuont, na petra int, na da beleh ez eont. Ar Helou Mad, an Aviel, a respont d'ar goulennou-ze.

Me eo an hent, a lavar deom Jezuz, me 'zo deuet euz Doue an Tad hag a zistro d'an Tad. C'hwi ivez, emezañ d'an dud, hag ivez kement a zo er bêd, a zeu euz a Zoue hag a zistro da Zoue. Setu aze dija eur respont sklêr.

Me eo ar wirionez a lavar deom ivez, deuet on evid rei testeni d'ar wirionez, ha kement hini a zo den a wirionez a zelaou va mouez (Yn. 18/37). Petra eo

ar wirionez, a houlenne Pilad? N'eo ket êz atao her gouzoud. Fazia a heller. Med êsoh eo gouzoud peur ez eer a-eneb ar wirionez, peur e komzer a-eneb ar zoñj. Diwar ar gevier, berniet dre ar bêd, eo e-neus an den da houzañv ar bevrvasa euz e boaniou. M'o-deus c'hoant beza eüruz e vo red dezo mond gand hent ar wirionez, an hent diskouezet d'an den gand ar Hrist. Setu aze eur respont all: *Me eo ar vuhez.*

Ennañ edo ar vuhez, eme adarre Sant Yann 1/4. Kement a zo beo ha n'eo ket hepken an den, med ivez ar chatal, an drevajou, a zeu o buhez euz ar Hrist. Ha setu perag ne heller ket kaoud re a zoujañs evid kement buhez a zo. Zoken ar vuhez da henel hag an hini a zo war he diskar.

Evid rei da anaoud respochou an Aviel da houlennoù an dud a hirio, e vefe red dibuna an Aviel penn-da-benn. Eur respont c'hoaz koulskoude: diwar-benn stad ar briedelez. Meur a wech e-neus roet Jezuz e gelennadurez war ar santel m'eo ar briedelez. Aviel Sant Vaze 19/9 a lavar deom kement-mañ: *Hel lavared a ran deoh; an neb a gas kuit e wreg, nemed ha serh e veje hag a zimez gand unan all, a ra ar pehed a avoultriez.* Hervez an Aviel ne heller dispartia nemed diouz eur zerb!

- Kaoud a ra deoh e vez ken lennet an Aviel bepred gand an dud pa'z a war nebeutaad an niver euz ar re a vez o tãrempredi an ilizou?

N'ouzont ket, med ma ne vez aviel ebéd a-dra-zur ne vo ket lennet. Ol levr aviel a zo kinniget d'an oll: *Kemerit, lennit!*

Gwir eo ez a war greski an niver a dud ha ne vezont ket mui « war-dro ». An hini a hellfe lavared perag, a rentfe servij deom. Hiniennou marteze a ya kuit evel en eur gila dipitet gand ar bevañs spirituel dizaour roet dezo a-wechou. An Aviel a vo evid ar re a lenno anezañ gand aket eur vagadurez vad hag a vleunio evid ar vuhez peurbaduz. En deiz all e-neus lavaret eun den din e-noa lennet al levr penn-da-benn koulz lavared heb distaga; unan all a lavare e lenne bemdez diouz an noz diou pe deir bajenn euz al levr. Esperañs on-eus e vo kavet al levr dizale e meur a diegez e Breiz, hag e vo kavet tost d'an dorn. Meur a damm amzer vak a vez en tiegeziou. Bez' ez eus ivez frered ha leanezed divoazet diouz ar brezoneg abaoe pell 'zo hag a zo kroget da lenn anezañ. Unan anezo a lavare ez oa meur a her hag a yee a-biou dezi... Med kendelher a ra da lenn.

- Piou a lenno hoh Aviel? Peseurt digemer a vo greet dezañ, a gav deoh? Rag peurliesha ne ganer nemed eun overenn vrezoneg ar bloaz er parrezioù? Ne gav ket deoh eo re nebeud, hag e tleje beza unan ar miz, pe unan ar

zizun da nebeuta el leh ma'z eus, evel e Plouvien, ouspenn 60% euz an dud o komz brezoneg?

An Aviel ha pa ve troet e brezoneg n'eo ket eul lev overenn. Med ar beleg hag ar re a ra war-dro an overennou e brezoneg, a gavo ennañ bremañ kement o-deus ezomm evid an oll overennou a hell beza lidet e-doug ar bloaz, ha kement-se, en eur brezoneg êz da gompren ha da lenn. Evel kalz tud eh en em houlenit hag a-walh a overennou a vez lavaret e brezoneg. N'eus ket, sur eo. En darn-vasa euz ar parrezioù diwar ar mêz, e vije êz kaoud eun overenn ar miz. Ar parrezioù o-deus kendalhet da boania war ar poent-se, o-deus gwelet an dud o tireded ha peurliesia o chom fidel d'o overenn e brezoneg: da skwer parrezig Rumengol. Eun dra êz eo da ober peogwir e heller peurliesia kinnig d'an dud eun overenn all hag alêz meur a hini e galleg. Pep hini a hell neuze eta dibab e overenn hervez e hoant. Red eo beza war evez euz eun dra koulskoude: chom heb koueza er hoch koz: kantikou brezoneg hag ar rest e galleg, evel ma veze greet gwechall, ar hantikou e brezoneg hag ar peurrest e latin. Gwelloh e ve d'am zoñj, eun overenn e brezoneg penn-da-benn eur wech an amzer d'ar re o-deus c'hoant hag overennou e galleg d'ar re all.

Chaloni Elard.

Kristian BRISSON

AR REDER-MOR

Romant pe varzoneg?
Deoh da varn!

25 lur digand Brud Nevez (kuit a vizou kas).

Ostaleri Surat

Beza oa, en kêr Suratt, eun ostaliri e leh 'n em vode kalz a estrañjourien goude kreisteiz.

Eun deiz bennag 'arruas eno eur seidr persan, da lavaroud eo eun doktor a relijion, skrivet gantañ e-pad e vuhez, war an doueidgez, ha kollet gantañ bremañ ar gredenn en Doue.

—« Petra eo Doue? a beleh e teu? gand piou ez eo bet krouet? peleh emañ? Mar 'n-eus eur horv, gwelet e vefe. Mar ez eo eur spered, beza vefe anaoudeg ha leal; n'aotrefe ket e vefe tud reuzeudig war an douar. Me va-unan, goude beza labouret kement en e zervij, a dlefe beza bremañ beleg-braz en kêr Ispahan, ha ne dlefen ket beza bet lakeet da guitaad ar Pers goude beza klasket sklêrijenni an dud. N'ez eus eta Doue ebed.»

Setu penaoz e komze an doktor, pennfollet gand ar fouge dre forz enklask war genta abeg peb tra, ha kollet gantañ e boell, arru ma oa da gredi ne oa skiant ebed o houarni ar Bêd-oll pa oa e dammig skiant e-unan an hini eo a oa eet da netra.

Beza en-devoa eur sklav kafr, a yee koulz lared en noaz, lezet gantañ ouz dor an ostaliri. Hogen en a yeas da hourveza war eur sofa hag a gemeras eun tasad kokenar pe unan opiom. Pa oe krog an evaj da domma e empenn, en a hoantaas komz ouz e sklav a oa azezet war eur mên da heoli, en eur dremen e amzer oh argas ar helien a oa o klask suna anezañ.

—« Morian didalvez, emezañ, na re a gred e zo eun Doue?»

—« Piou eta a hallfe kaoud douetañs! eme ar hafr.» Hag en, war-ze, da denna a-zindan an tamm truillenn a oa endro d'e vandenn, eur marmouzig koad, ha da lavaroud:

—« *Setu amañ an Doue en-deus miret ahanon abaoe ez on er béd: greet eo bet gand eur barr euz eur wezenn fetij a zo em bro.*»

Kement den a oa en ostaliri a vanas souezet, koulz gand respont ar sklav, ha gand goulenn ar mestr.

Neuze eur braman, o sevel e ziouskoaz a lavaras d'ar morian: —« *Paour-kéz diod! Penaoz 'ta? te a zoug da zoue en da houriz? Desk n'ez eus Doue ebed nemed Brama, krouet gantañ ar béd, an hini emañ e demplou war riblou ar Ganj. Ar bramaned hepken a zo e veleien, ha dre e skoazell karantezuz, int em zalh buhezuz abaoe c'hweh-ugent mil bloaz, en desped da reveulziou an Indrez.*»

Raktal eur henwerzer Yudeo a generas ar gomz.

—« *Penaoz, emezañ, e hall ar bramaned kredi n'en-deus Doue templou nemed en Indrez ha n'ez eus eun Doue nemed evid o breuriez? N'ez eus Doue ebed nemed Doue Abraham, ha Doue n'en-deus pobl ebed nemed pobl Izrael. Miroud a ra e bobl, kaer en-deus beza ledet hemañ war an douar, bete ma'n-devo dastumet anezañ, e Kêrsalem, evid rei dezañ impalaerded an oll vroadou, goude ma'n-devo hadsavet an Templ a zo bet gwechall marz ar Béd-oll.*» Hag ar Yudeo da skuill daerou. E oa o vond da gomz adarre pa zavas eun Italian, en e vroz hlaz, da lavaroud gand kounnar:

—« *C'hwi a ziskouez eun Doue displeal pa lavaret ne gar nemed pobl Izrael. Dinahet en-deus-eñ abaoe seiteg kant vloaz, evel ma hallet henn gweloud dre m'int hadet war ar béd. Gervel a ra bremañ an oll e-barz an Iliz roman, n'eus silvidigez ebed er-mêz anezi.*»

Eur beleg protestant, a vision Danoazed Trinkebar, a respontas, en glaz dremm, d'ar misioner katolik:

—« *Penaoz e hallet-hu miroud silvidigez an dud d'ar re hepken a zo en ho kumunugez a falz azeulidigez? Desket eta ne vezo silvidigez nemed evid ar re o-devo, hervez an Avel, azeulet Doue en spered hag en gwirionez dindan lezenn Jezuz.*»

Neuze eun Turk, ofiser maltoutiri Suratt, a oa o sacha war e gorn-butun, a lavaras d'ar gristenien gand eun êr hweg:

—« *Tadou, penaoz e hellet-hu miroud anaoudegez Doue en hoh ilizou? Lezenn Jezuz a zo torret abaoe arruidigez Mohammed, an hini ez eo ar Paraklet diouganet gand Jezuz en e-unan, Verb-Doue. Ho relijion ne chom beo hepken nemed en eun nebeud rouanteleziou; war he dismantrou eo savet on hini en kaerra lodenn an Europ, an Afrik, an Azi hag heh enezennou. Setu-hi herie azezet war dron ar Mogol hag oh en em leda beteg ar Chin, bro ar sklêrijenn. Asantet*

eta gand galvidigez ar Profet hag e hourdrehiou. Ne vezo silvidigez ebed nemed evid mignoned Mohammed ha re Omar, rag ar re a heuil Ali n'int nemed paganed.»

Pa deuas gantañ klevoud kement-se, ar seidr hag a oa euz ar Pers, 'leh m'ema ar bobl oh heuil breuriez Ali, ar seidr eta 'n em lakaas da hoarzin. Hogen sevel a reas eun tabut braz, en ostaliri, etre an estrañjourien a oa euz a relijionou disheñvel. Beza oa c'hoaz, en o mesk, kristenien abisiniad, Kopfted, Tartared lamasiadel, Arabed ismaeliad ha Gebred, pe azeulerien an tan. Int oll a dabute diwar-benn ganadur Doue, diwar-benn e azeulerez, pep hini o prezeg ne oa ar relijion wir nemed en e vro.

Beza oa eno eur Chinoad gouizieg, diskibl da Genfouzious, hag a oa o vale bro evid deski. En eur horn euz an ostaliri e oa oh eva te hag o chilaou, heb lavaroud ger. Ar maltoutier turk en em droas war e du hag a huchas a vouez uhel:

—« *Chinoad mad a zo aze peuhuz, c'hwi a oar a zo 'n em zilet meur a relijion e Bro-Chin. Marhadourien euz ho pro, hag o-deus bet ezomm diouz va zervijou amañ, o-deus disklêriet din kement-se; an hini wella, emezint, ez eo hini Mohammed. Deoh ivez da rei dorn d'ar wirionez, petra soñjet-hu diwar-benn Doue ha diwar-benn relijion e Brofet?*»

Ar peuh a renas raktal en ostaliri. Diskibl Kenfouzious, goude sachet gantañ e zaouarn en mañchedou ledan e vroz, a groazas aneze war e vruched. Soñjal a reas eur pennadig; hag eñ da lavaroud gand eur vouez plên ha seder:

—« *Aotrounez, mar aotreet ahanon, me lavaro deoh: Ar fouge an hini eo a stourm ouz an dud da 'n em glevoud; mar houzañvet chilaou ahanon, me a ya da ziskleria deoh eur skwer a zo c'hoaz fresk em eñvor. Pa guitais ar Chin, evid dond da Suratt, me a bignas war eul lestr saoz evid ober tro ar béd. Eun deiz bennag ni a daolas an eor war 'aod sao-heol enezenn Sumatra. Da greisteiz, me a ziskennas d'an douar gand eun nebeud mordeidi, ha setu-ni da azezi war ribl ar mor, tost d'eur gêrig, en disheol gwez koko, leh ma oa dastumet tud euz ar vro evid ehan. Arruoud a reas eno eun dall, kollet gantañ ar gweloud dre forz selloud ouz an heol. Bet en-devoa an diotiz da glask anaoud natur an heol evid miroud evitañ e-unan sklêrijenn hemañ. Esaet en-devoa, gand sikour ar gwer, an dourennoniez, ha memes gand sikour an nekromanonez, klenka eur bann heol en eur voutail; ha dre ma ne oa ket deut gantañ d'henn ober, eñ a lavare:*

—« *Sklêrder an heol n'eo ket eur horv-emzil, rag n'hall ket beza fiñvet gand an avel; n'eo ket eur horv-kaled, rag n'hall ket beza didammet; n'eo ket eun tan, rag ne varv ket e-barz an dour; n'eo ket eur spered, rag n'eo ket gwelabl;*

n'eo ket eur horv, rag n'haller ket henn dormiata; n'eo ket eur mouamant, peogwir n'hall ket fññval ar horvou ar muia skañv; neuze 'ta n'eo netra ebed.»

D'an diwez, dre forz selloud ouz an heol, ha tamall war e sklêrder, koll a reas e zaoulagad, ha gwasoh c'hoaz, koll a reas e skiant. Kredi ' reas ne oa heol ebed ken er Bêd-oll pa oe kollet gantañ e weloud.

Beza 'n-nevoa, evid blenier, eur morian. Hemañ, goude beza greet d'e vestr azezi dindan eur wezenn goko, a zastumas eur graouenn-goko war an douar hag a reas eur hleuzeur gand he hrogenn hag eur vechenn gand he bleo; tenna ' reas ivez eur banne ivoul diouz ar gokoenn evid lakaad er hleuzeur. Keid ma oa ar morian oh oberi er hiz-se, an dall a lavare, en eur huanadi:

—« N'ez eus sklêrder ebed ken e-barz ar béd!

—« Beza ez eus hini an heol, eme ar morian.

—« Petra eo an heol? eme an dall.

—« N'ouzon ket, eme an Afrikan. Gouzoud a ran hepken e krogan gand va labour pa zav an heol, hag e vez diwez va labour pa ya da gousked. Ouz e sklêrder ne ran, me, kement a van hag ouz hini va hleuzeur a sklêrijenn ahanon em zi; paneved dezañ n'hallfen ket servij ahanoh e-pad an noz.»

Ha neuze, o tiskouez e gokoenn: « Setu amañ va heol, emezañ.»

Eun den euz ar gêrig-mañ, hag a gerze gand fraillou, en em lakaas da hoarzin pa hen klevas. Hag eñ da lavaroud, dre ma krede oa an dall eun dall-ginidig:

—« Desket eta ez eo an heol eur voul tan hag a zav bemdez euz ar mor hag a ya da gousked bemnoz, er huz-heol, e meneziou Sumatra. Kement-mañ e welfeh-c'hwi hoh-unan, evel dom-ni oll, ma piñe ar gweloud.»

Eur peketour a gemeras ar gomz hag a lavaras d'ar hamm:

—« Gweloud a-walh a reom n'out bet biskoaz pelloh eged da gêrig. Ma'z-piñe diouer d'ober an dro da Enezenn Sumatra, te a ouezfe ne ya ket an heol da gousked en meneziou Sumatra. Hogen bemdez e sav euz ar mor ha bemnoz e tiskenn ennañ da 'n em didana. Kement-se a welan-me bemdez war an aochou.»

Eun den hag a oa o chom e Gourenez an Indrez a lavaras neuze d'ar pesketour:

—« Penaoz eun den hag en-deus e benn dezañ a hall kredi ez eo an heol eur voul tan o sevel bemdez euz ar mor hag o tistrei ennañ da 'n em didana? Desket eta ez eo an heol eun doue euz va bro. Bemdez e treuz an neñv en eur harr o trei endro da venez abar Merouwa; pa ya da guz, lonket an hini ' vez gand

daou zerpant, Ragou ha Ketou, ha n'ez eus nemed pedennou Indrizien riblou ar Ganj evid hen dierea. Red eo beza eur Sumatraiad fougeüz-diod evid kredi ne luh an heol nemed war dremmwel e enezenn. Ar zoñjezon-ze n'hall ket en em zila en penn'eun den hag en-deus redet ar mor war eur skav.»

Eul Laskar, patrom eul lestr a gemerz a oa eno war eor, a gomzas neuze evel-henn:

—« Fougeüsoh ez eo c'hoaz kredi ez eo muioh karet an Indrez gand an heol eged an oll vroiou dre leh ma' on-me tremenet. Beajet am-eus dre ar Mor Ruz, war aochou an Arabia, en Madagaskar, en Enezennou Moluk hag er Filipined. An heol a sklêrijenn ar broiou-ze koulz hag an Indrez. Ne dro ket endro d'ar meneziou, hogen sevel a ra en enezennou ar Japan, hanvet, abalamour da gement-se, Japon, pe Gue-puen, da lavaroud eo ginidigez an heol, ha mond a ra da gousked pell-pell er huz-heol, en tu all da enezennou Breiz-Veur. Me zo sur a gement-mañ, rag laret zo bet an dra-mañ din, pa oan bihan, gand va zad-koz, beajet gantañ bete pennou pella ar mor.»

C'hoaz en-dije komzet hirroh paneved eur martolod saoz diouz on lestr, a drohas e gomz dezañ hag a lavaras:

—« N'ez eus bro ebed leh ma'z eo anavezet welloh hent an heol eged e Bro-Zaoz. Desket eta ne zav na ne gousk an heol nebleh. Dalhmad emañ o trei endro d'an douar. Me zo zur a gement-mañ, rag ni on-deus ivez greet an dro-ze, ha dre-oll ni on-deus-eñ kavet.»

Neuze e kemeras eur wialenn a oa en dorn unan euz ar re a chilaoue, hag e reas eur helh war ar grean en eur disklêria deze hent an heol etre an daou gelh-tropik. Hogen dre ma n'halle dond a-benn da zispaka reiz-mad e gentel, eñ a halvas levier al lestr da rei testiñ evitañ. Al levier-mañ a oa eun den fur, chilaouet gantañ an tabut heb lavaroud ger; pa welas an oll chomet en peuh evid chilaou, eñ a gemeras ar gomz hag a lavaras:

—« Pep hini ahanoh a fazi ar re-all hag a zo faziet gante. An heol ne dro ket endro d'an douar: an douar an hini eo a dro endro d'an heol en eur diskouez dezañ, en peder eur warn-ugent, bremañ enezennou ar Japan, goude ar Filipined, ar Moluked, Sumatra, an Afrik, an Europ, Breiz-Veur, ha broiou all c'hoaz goude. An heol ne luh ket hepken evid eur menez, eun enezenn, eun dremmwel, eur mor, na memez evid an douar; hogen eñ a zo e-kreiz ar béd hag eñ, ahane, a sklêrijenn an douar ha pemp planedenn all a dro endro dezañ, darn euz ar re-mañ kalz brasoh c'hoaz eged an douar ha kalz pelloh egetañ diouz an heol. Uran dioute, Saturn, he-deus eun dreuzenn a dregont mil leo, ha daou hant pemp ha pevar-ugent mil leo a zo etrezi hag an heol. Ne gomzan ket euz al loariou a gas sklêrder an heol d'ar planedennou a zo pell dioutañ hag e zo dioute meur a hini. Pep hini ahanoh en-dije doare euz ar gwirioneziou-mañ

ma rofe bemnoz eun taol lagad etrezeg an neñv ha ma n'en-dije ket ar fouge da gredi ne lugern an heol nemed evid e vro.»

Setu penaoz e komzas al levier en-devoa greet tro ar béd ha studiet an neñvou, estlammet gantañ e chilaouerien.

Ha diskibl Kenfouzious da lavaroud c'hoaz:

«C'hoarvezoud a ra gand Doue evel gand an heol. Peb den a gred hen kaoud evitañ e-unan en e chapel, pe da vihanna en e vro. Heb pobl a gred miroud en e demplou an Hini n'ez eo ket miret e-barz ar béd a hellom gweloud. Koutskoude na beza ez eus eun Templ da geñveri gand an hini en-deus savet Doue evid dastum an oll dud en eun heveleb kumunugez? Oll demplou ar béd a zo greet war batrom hini an natur. Er peuryuia dioute e kaver stivellou, pe piñsiniou dour benniget, peulioù, bolzioù, kleuzeurioù, skriturioù, levrou al Lezenn, aberzou, aoterioù, beleien. Hogen en pehini ez eus eta eur piñsin dour ken braz hag ar mor ha n'emañ ket en eur grogenn; peulioù ken kaer ha gwez on hoajoù, pe gwez on beurjeoù, sammet gand o freuz; eur volz ken uhel hag hini an neñv; eur hleuzeur ken lugernuz hag an heol? Peleh e vezo gwelet skeudennou ken talvoudeg hag ar grouadurien anaoudeg en em gar, en em sikour, en em gomz? Skriturioù ken frêz ha ken relijiuz ha madelezoù an natur? Eul lev-Lezenn ken olleg ha karantez Doue, diazezet war on trugarez ha karantez on far ha war on mad on-unan? Aberzou ken tener hag on meuleudioù evid an Hini en-deus roet dim peb tra, hag on harantez evid ar re ez eo dleet dim ranna ganto? eun aoter ken santel ha kalon an den mad leh ma'z eo beleg Doue eñ e-unan? Evel-se 'ta, seul vui an den a vezo trugarezuz evid an dud, ha seul vui e heulio skwer Doue. Ra ne vezo ket eta disprizet ar falskredennerien gand an hini en-deus bet sklêrijenn Doue a zo skuillet er Béd-oll, rag ar falskredenner ne wel nemed eur bann bihan euz e idol. Ra ne vezo ket mui disprizet gantañ an den digredenn a zo heb bann ebed, gand aon na vez kastizet evid e fouge evel ma oe kastizet ar filozof a deuas da veza dall o hoantaoud sklêrijenn an heol, bete ma renkas kemer, evid en em vlenia, kleuzeur eur morian.»

Evel-se e komzas diskibl Kenfouzious, ha kement hini a oa en ostaliri o tabuti war vadelez ar relijion, a glozas e henou.

Troet e miz even 1911.

diwar galleg Bernadin de Saint-Pierre
gand Erwan Berthou (Kaledvoulc'h).

O haloupad war henchou Breiz-Izel

Eun enklask war ar brezoneg

III

Med perag an **Atlas Nevez**-se, pa oa dija hini ken talvouduz **Pierre Leroux**?

En eun Atlas ne heller ket, sur eo, lakaad dirag an daoulaad toud gerioù eur yez. Hini **Pierre Leroux** ne ro deom nemed c'hwec'h kant ger. C'hwec'h kant ger n'eo ket kalz, n'eo ket zoken, da weled da vihanna, kaiz a ora e-kichenn an tregont mil pe dost a zo er brezoneg.

Med e gwirionez ez eo eul lodenn vad dija, rag ar gerioù a gaver ennañ a zo gerioù simpl, ar re a vez greet implij anezo an alies, hag ar re o-deus, abalamour da ze, ar muia a dalvoudegez evid kement hini e-neus c'hoant studia ar yez.

A-walh eo da vihanna da ziskouez sklêr penaoz e veze komzet ar brezoneg d'ar poent-ze, d'ar poent ma oa bej greet an enklask.

Atlas Pierre Leroux a oa bet savet etre 1910 ha 1925, da lavared eo da boent gwella ar brezoneg, d'ar poent ma oa kreñv c'hoaz. Kredi a ran zoken ne oa ket bet biskoaz ken kreñv ha neuze: kaozeet e veze gand an oll war ar mêz hag entetet mad gand an oll e kêr, nemed e-kreiz kêr Vrest. Skrivet e veze. Lennet e veze koulz lavared gand an oll. Rouez e veze an tiez hag a ne veze ket lennet enno bemdez diouz an noz **Buhez ar Zent**. E meur a di e veze lennet beb sizun eur gazetenn vrezoneg bennag (evel ar **Hourrier**), beb miz **Feiz ha Breiz** hag aliez **Breuzie ar Feiz**.

Bremañ emaoñ en eur poent all euz buhez ar yez, eur poent hag a zo kement a leh da glask gweled petra eo deuet hi da veza abaoe. Red eo zoken. Perag? Abalamour ma'z eus deuet en hanter-kant vloaz diweza ke-

ment a cheñchamant enni ha ma 'mañ marteze war ar poent da vond d'an traoñ, da vihanna ma ne vez ket greet muih eged bremañ evid he derhel en he zao.

Ar cheñchamant brasa, an hini e-neus skoet da genta va skouarn ha va spered dre ma'z een gand an enklask eo ez eus deuet er brezoneg eur bern geriou galleg evel **elektresite, telefon, post, petrol, esañs, oto, jeografi** ha me oar c'hoaz, geriou teknik hag a oa dija bet tennet o-unan a-raog er galleg euz ar gresianeg koz hag euz al latin evid envel traoù nevez. Med ar geriou-ze n'eus ket muih da veza estonet o weled anezo er brezoneg eged er galleg, rag pell 'zo emaint e kement yez a zo er béd. Ouspenn ar beurrasa anezo a vez distaget e brezoneg en eur feson disheñvel ouz ma vezont e galleg. Ar brezoneg e-neus merket mad anezo.

Eur cheñchamant all em-eus kavet, kalz gwasoh eged hennez. Lod euz an dud o-deus kollet ar geriou simpla evel **ya** ha **nann**; ne deu ganto nemed **non** ha **oui**, beza ma vez ar goulenn a-raog e brezoneg.

Meur a hini, ar re goz zoken, ar re hag a n'o-dije ket soñjet biskoaz lavared eur ger galleg er gêr en o yaouankiz, a vez tentet aliez bremañ da gaozeal galleg, memez pa n'o-dez ket a leh da ober. Ped gwech em-eus bet poan o lakaad ar re a welen evid an enklask da respont din e brezoneg! Tud goulskoude hag a vezen sur ne deue ganto nemed brezoneg kerkent ha ma vezent etrezo.

Med an dra-ze a ouien dija a-raog an enklask. Hemañ e-neus lakeet ahanon da weled sklêr penaoz ez eo en em gavet. N'eo ket deuet en eun taol, beza ma'z eo deuet buan a-walh, peogwir ez eo deuet war dri rummad tud nemetken, war deir jenerasion. Ar rummad diweza e-neus dalhet e-pad eur pennad brao, beteg ar brezel diweza, ar brezoneg beo ha kreñv eo hini ar re o-deus bremañ pemp bloaz ha tri-ugent pe ouspenn. Med eñ a zo ivez an hini kenta e-neus lakeet anezañ da goll e nerz.

Toud tud ar rummad-ze o-doa desket ar brezoneg war varlenn o mamm. Toud e oant evel don-me. A-raog mond d'ar skol, da hweh pe da zeiz vloaz, ne ouient ger galleg ebed. Endro dezo, er gêr evel e leh all, ne glevent nemed brezoneg. Er skol zoken, kerkent ha ma veze troet e gein gand ar mestr, ez eo brezoneg eo a deue ganto en desped d'ar pinijennou. An dra-ze goulskoude ne vire ket outo e mod ebed da zeski mad ar galleg ha da houzoud anezañ aliez kalz gwelloc'h eged ar Hallaoued.

Bremañ, pa vezont etrezo, e kendalhont atao da gomz brezoneg, ha brezoneg nemetken. Pa vezont gand o bugale, ar re-mañ tud etre daou-ugent vloaz ha tregont vloaz, ne deu ganto koulz lavared atao nemed brezoneg. Med pa vezont gand o bugale vihan, memez gand ar re a chom er gêr, zoken

gand ar re gosa anezo, ne deu ket ken ger brezoneg ebed ganto. E-giz-se eo o-deus lakaet ar yez da ziskenn pazenn genta ar skalier a gas anezi d'an traoñ.

An eil rummad, hini o bugale, eo e-neus greet ar muia a zroug dezi, Ind-i eo o-deus lakaet anezi da goueza a-benn-kas tost d'ar bazenn ziweza. Tud ar rummad-mañ, pa vezont etrezo, a deu c'hoaz peurlieuz brezoneg ganto, med galleg ivez aliez a-walh. Lavared a hellfed ne ouezont ket re petra da ober pe zerhel d'ar brezoneg pe e leuskel da goueza. Marteze kentoh n'eus ket ken o lakaad anezo da zerhel eun tamm dezañ nemed, evel gwechall, eun tamm doujañs d'o zad ha d'o mamm. Dirag ar re-mañ ne gredont ket ober fae war ar brezoneg. Rag pa vezont o-unan ganto ne gredont ket kaozeal galleg. Med pa vezont gand o bugale, ne glever ket ken ganto nemed galleg. Galleg atao, beza ma'h entent mad ar re-mañ ar brezoneg.

Hag abalamour da ze, ez eo hemañ, an trede rummad, eo a zo o peur-echui da lakaad ar brezoneg da goueza d'an traoñ diwar bazenn ziweza ar skalier, leh 'ma bremañ o vranskellad. Paotred ha merhed ar rumm-mañ, beza ma'h ententont c'hoaz ar beurrasa anezo ar brezoneg, dre ma ne glevont bemdez nemed galleg endro dezo, ne fell ket dezo ken, pe dre vez, pe dre leziregez, implij ar brezoneg na gand o zud na zoken gand o zud-koz, peogwir ar re-mañ a bleg dezo.

N'eus ket da gonta e-giz brezonegerien ar re a deu dezo eur pennad 'zo ober van da zeski komz brezoneg, memez ar re anezo a zo diwar ar mêz. En dud-ze, ar c'hoant da houzoud anezañ ne vez peurlieuz nemed eur froudenn, eur froudenn hag a ya da goll en êr kerkent ha ma teu dezo mond da chom e kêr.

Med, henn anzav a ranker, n'eus ket da veza souezet o weled ar re yaouank ken tentet gand ar galleg. Ar vuhez o laka re aliez dirazañ, dre ma vez partoud bremañ. A-leiz a rank mond da vev da gêr. Eno ne vez ket ken eur ger brezoneg. Kêriz a zigas anezañ ganto, pa deuont da bourmen war ar mêz pe da lakaad sevel eun ti e bord ar mor, e-giz ma'z eo deuet ar hiz, pe en eur horn trañkil, e bord eur hoad bennag. Biskoaz ne deu da hini ebed euz ar re-mañ en em lakaad da zeski yez ar re a zo endro dezo hag a oa eno pell a oa en o raog. Penaoz e rafent? N'o-deus nemed disprizañs evito. Hag ouspenn, pa dez ezomm outo, ar re-mañ eo o-dez da hallegad ganto ha tamm-ha-tamm e teuont da veza touellet ganto ha gand ar galleg. Hag hemañ a deu evel-se da en em skigna diwar goust ar brezoneg.

An dra-ze, ar brezoneg o vond war fallaad eo an dra genta am-eus kavet oh ober va enklask. Eun dra drist kenañ! Eun drouez eo gweled eur yez ken koz, ken kaer, ken pinvidig, o vond da fall evel-se!

Bet on gand an aotrou An Du, d'an deiz kenta a viz mae 1972, 'oh ober an enklask en enezenn Groe, an enezenn gaer a zo just dirag antre porz-mor an Oriant. En enez Groe, tri-ugent vloaz 'zo, pa oa bet Pierre Leroux oh ober e enklask enni, ne veze klevet komz nemed brezoneg. Mad, pa oam bet ni eno, c'hweh vloaz 'zo, ne oa ket ken nemed daou zen gouest d'e gaozeal mad, daou zen koz. An hini kenta a oa eur vaouez a zaou vloaz ha pevar-ugent, sonn ha solud, lemm he lãgad, lemm he spered ha mad a-walh he memor evid respont d'on goulennou e-pad div eur heb fasia hag heb diskouez an disterra skuizder. Ne ouie na lenn na skriva. Ne oa bet biskoaz er skol. Goulskoude e ouie mad a-walh ar galleg. Gwir eo ne oa ket he zeod ganti en he godell hag he brezoneg a oa euz ar re wella. Meur a wech ez eo bet en em gavet ganen beza souezet-braz o weled pegen lemm e vez aliez spered tud humbl ha dister evel ar vaouez-se ha pegement a furnez hag a skiant o-dez dastumet en o buhez hir, aliez dre ar vizer hag ar boan.

An eil a oa eur beleg koz a zaou vloaz ha pevar-ugent evel di. Bet e oa misioner er Chin e-pad hanter-kant vloaz. Chomet e vije bet zoken eno da echui e amzer ma ne vije ket bet greet dezañ mond kuit gand paotred Mao-Tse-Toung, pa oa deuet hemañ da houarn ar vro. Pa oam bet o weled anezañ e oa o paouez distrei d'ar gêr. An den a oa plijaduruz a-walh e weled; dre ma 'n-oa bevet ar bevrvasa euz e vuhez e-touez ar Chineed, e oa deuet da veza heñvel-poch outo. Gand e damm barbich berr hag e grohenn ken melen hag hini eur Chinaad, e vije bet lavaret e oa dirazom eur gwir mañdarin Chinaad. Beza ma 'n-oa bevet keid-all er Chin ha kemeret feson ar Chinaed, e ouie c'hoaz mad ar brezoneg. « Ya, emezañ, e houzoud a ran atao. Eun tamm falloh goulskoude eged ar chinaeg.»

Kredi a ran ez eo rouez bremañ ar parrezioù hag a vefe gouest toud an dud enno da gomz brezoneg ingal evel gwechall. Greet em-eus an enklask e pemp parrez ha kant, med n'em-eus ket kavet nemed unan, Rozfioen (1) (Rosnoen war ar hartennou), eur barrez vraz tost d'ar Faou, war an dorgenn a-zioh traonienn gaer ar stêr Aon. Eno, sekretour ar mêri a warante din, da viz du 1971, e ouie c'hoaz ar brezoneg toud ar barrezioniz, koz ha yaouank hag e kendalhent da gaozeal anezañ kement ha gwechall. Med pegeid e kendalhint c'hoaz d'henn ober?

Y. Miossec.

(1) **Rozlohen** a hañval beza implijet peurliesia.

Tammou traou

Dindan heol kraz ar Provañs

Broiou dañjeruz zo er béd-mañ. N'eus ken mond da Vro-Brovañs e-giz m'on bet en hañv-mañ. Tammou traou disheñvel-mad a zo e sevenadur, hag e doareoù an dud e broiou disheñvel, kea. Hag euz petra 'gav deoh ez eus ano ganin amañ? Beza eno o veaji en eun oto.

Kement-mañ a zisplegin en eur gonta deoh da genta an dro nemeti oan eet da Bariz, kêr-Bariz, e va hoz tamm «Petra 'ri?»! Traou da baka eno em-oa, setu oan eet di. Mad, ne vin ket paket ken en eur ober. Ha «paket» eo ar ger, sur. Da genta oan degouezet gand gouleier kroaz-hent eet euz gwer da velen, setu-me chomet a-za, paotrig fur ha sentuz ma'z on. Gwir eo ivez eo e Bro-Gembre em-oa desket blenia hag em-oa bet va zamm madagaskarr, diouyezeg evel just.

Santet eur stokadenn ha klevet stir-link gwer freuzet en tro kein. Petra zo 'c'hoari? eur pasajer klandestin e vefe? Ket, eun oto all war va lerb oa deuet da hoari tos-tos ouzin-me. An dud-ze ez eus meur a hini en o zouez, 'benn ma welont ar gouleier gwer o tarevi e sinifi evito: eitaou, Marjan! E-leh din-me ez oa «O!». Darempredou sevenadurel adarre.

E Bro-Brovañs 'vad eo gwasoh c'hoaz, e kêr ha war ar miz. An nebeud 'm-eus bet tro d'ober darempred gand kêr Ais de Provèca n'eus diskouezet din n'oa ket gwall-yahud din-me, nag en oto na war va zroad. Eno pa vez ruz ar gouleier, ha n'eo ket war-nez beza eo a lavaran deoh, pa vez ruz tan, ruz-mad an hmi eo. Mad, petra 'ra an dud? Selied a-gleiz hag a-zehou e kenkas e vefe archerien. Ha ma n'eus ket mond. Ha n'eo ket tammou hailloned ugent vloaz ez oa, gwelet 'm-eus bet eur vamm a famil, tost hanter-kant vloaz, bugale dezi ha toud, oh ober. Gouzoud a ran rag en he oto e oan. Gwelet 'm-eus bet ivez eun tad-koz o chom a-za, gouleier ruz a oa. Me war e lerb, chom a-za ivez. Mad, an oll otoiou a oa erru goude-ze, seiz pe eiz anezo, o-deus dibaseet ahanom hag a zo tremenet prop ha kempenn. Setu war droad eo gweloh beza anaoudeg.

Eur vro interesant a-hend-all rag pedet oan da vond di gand eur stourmer evid yez ar vro. Chomet deg devez dre an heol kraz ha toud, banne dour ebed nemed da eva e veze.

Aon 'm-oa beza lakeet diéz rag aliez mad e kavan re domm e-kreiz an hañv pa vezan e Kerne. Setu izelloh c'hoaz! Memestra oam eet, Mari a zu-mañ 'doa c'hoant rouza eun tamm hag en hañvez a-raog oam bet e Bro-Skos an uhella e-pad miz hanter: n'oa bet nemed tri devez heol (ha c'hoaz, toueziet gand eun nebeud mad a goumoul) etre toud. Ha glao, hardi. Setu eet en tu all neuze.

Gellet evel-se keñveria radio « Vau-cluse » (e kalon ar vro brovañseg a yez) ha Radio Breiz-Izel. Kenteliuz a-walh ivez. Hervez va hamalad alese ne vefe nemed unan euz an dud a labour eno hag a ouezfe eun tamm bennag yez ar vro. Ar peb brasa oll anezo eo galleg Pariz a deu ganto, « parla ponchu » kwa.

E-giz all evid pezh a zell ar brezelioù dre-zindan etre tud ar yez, ahe om-ni treh ganto. Amañ e Breiz ez eus chapelioù, hag ez eus, med mui pe vui e vez greet van n'eus ket euz ar re all. E leh etre Felibred hag Oksitanisted ez eus eun tamm brao a vrezel. Ar rektor akademiezh e-noa ranket kas dezo oll eul lizer o tisklêna e vefe red d'an oll a gelenne ar yez diskouez oant barreg da ober gand an diou skritur! Lod o-dije karet sevel peb a bajennad kenta en he fezh war ar gudenn-mañ e kazetennoù ar vro. Med e gwirionezh ne ra kemm ebed rag tro lavare an den-ze e vez kelennet ar yez nebeud-tre. Beuzet eo ar Brovañsiz gand an diavêzidi. Memez o galleg ton mouez ar provañseg dezañ a gomañs mond kuit e-touez ar re yaouank ginidig euz ar vro.

Ha n'eus forzh penaoz ivez... kazetennoù ar vro! En o heñver e vez kavet gras ar reoù euz tro amañ. Lakaad anezo en hanter-hent etre Le Monde ha re Bro-Brovañs. Bevañs treud, hag

hini ar vagadurezh spered eo a lavar an deoh, o-devez ind-i da lenn.

'Benn ar fin on-eus gellet en em denna alese divahagn, ha greet hent war on hiz da dremen diou zizunvez e-kreiz Bro-Berigor. Aze n'oa ket ken poaz-se ar vro ken. Chomet oam heb klask war-dro an emzaverien, med tro 'm-eus bet ivez da weled eo beomad ar yez eno, er hontron diouz ar peb brasa euz Bro-Brovañs.

Ha distroet alese, na sotoh na finnoh kalz eged a-raog mond, ha ken gwenn all va hrohenne-me eged pa oan eet.

Me 'gav din eo eno ivez em-oa tañvet gwin ruz evid ar wech kenta em buhez, ha me pase tregont vloaz. Me 'gav din rag n'eo ket skler-tre em memor ken. Ar pezh a ziskouez n'oa ket bet skoet kalz gand an darvoud dreist-ordinal.

Mikael Madeg.

Ar helaouennoù

Ar brezoneg:

Kollet e-touez ar zonerien?

Unan euz ar skeudennadurioù a vez ar muia skoet an diavêzidi gantañ pa deuont da Vreiz, eo, kredabl braz, ar zoneriezh 'giz ar vro. Sacha o evez a ra kement ar zonerien bagadoù (pe ar ganerien a hiz nevez kerkouiz all...) ha ma ra a-hend-all dañserien ar helhiou keltieg. Ha gwir eo ez eus fouge e B.A.S. oh embann eo milieroù a dud a zo bet tremenet dre he bagadoù abaoe an Dieubidigezh. Ema end-eeun o vond da lida war an ton braz, e miz mae ar bloaz a zeu, gouel he 40 vloaz: n'eus ket kalz a strolladoù hag a vije bet savet da vare trubuilhoù ar brezel diweza, hag a hellje hirio ober kemend-all.

Med eur bêd anezañ e-unan eo hini ar zonerien. Lehiet int en emzao sevenadurel, se zo sur. N'eus nemed kleved ar prezegennoù taer ha didroidelel a ra Paolig Montjarret evid beza asur a ze. Med a-raog peb tra int troet da lakaad ar muzik hag ar zoneriezh da vond war-raog, hag er heñver-ze, eo bet evito digoradur ar « Hoñservatoar », en Oriant, eur bazenn a-zoare. Peurlies, eo gand ar muzik - ha gand ar muzik nemetken - eo ema o freder. N'eus nemed taoler eur zell ouz o hazetennoù: war Ar Soner koulz ha war Musique Bretonne, e vez leuniet pajennadoù gand ar heleier o tenna d'ar henstrivadegoù, da vuhez ar bagadoù, da ouelioù an hañv, hag all... Normal eo, ha n'eus seurt ebed da lared: euz petra e komzo sonerien kenetrezo, ma n'eo ket da genta euz muzik? Ouspenn-ze, eul labour vraz, hag eul labour gaer aliez, eo a reont war o zachenn.

Setu perag e kaver heuliadoù tonioù fonnuz war ar helaouennoù. Lennet on-eus Ar Soner ha Musique Bretonne abaoe miz mae. En em lakeet eo an eil da voulla an tonioù pobl euz ar Morbihan a oa bet dastumet gwechall gand ar chaloni Mahe;

war eben, e vez moulet beb taol an toniou o-devez ar bagadou da zon da geñver ar henstrivadegou.

A-wechou e vez embannet eur studi bennag war **Ar Soner**, evel hini talvouduz A. Morgant diwar-benn ar pladennou kan-ha-diskan. Niverusoh eo ar seurt studioù war **Musique Bretonne**: diwar-benn « Kroaz aour Plouared », gand D. Giraudon; diwar-benn toniou bet skrivet euz ar 16ved d'an 18ved kantved, gand J.C. Maillard, hag all... E gwirionez, dedennet e vez ivez **Musique Bretonne** gand ar giziou pobl, hag embannet he-deus e-kerz ar miziu tremenet pennadou plijuz diwar-benn labour ar foenn e Breiz-Uhel, pe diwar-benn ar pardonioù hag an adpardonioù e Bro-Dreger, hemañ gand F. Peru.

Daoust da ze, en hini ebed, ne gaver eun hekleo don ha klok euz an oll stummu muzik e Breiz. Ha diskouez a raje niverenn ziweza **Musique Bretonne** eur chañ-chamant er heñver-ze? Embann a ra da nebeuta pennadou-kaoz hag a zigas eun dra bennag gand R. Becker ha gand izili ar strollad **Gwerz**. Med ral eo bet ar seurt pennadou beteg-henn. E gwirionez, e reer kaoz dreist-oll euz ar zonerezh bagadou war **Ar Soner**, ha setu perag zoken e oa bet savet **Musique Bretonne** eun nebeud bloaveziou 'zo gand eur strollad nevez hag a zo morgousket dija, hini **Sonerien ha Kanerien Vreiz**, hag a vode da genta sonerien daou-ha-daou evid ar muia. Beteg-vremañ, e ranker lavared, eo troet pep hini euz an diou gelaouenn gand serten stummu 'zo a vuzik nemetken. Kaoud a ra din e vank eur gelaouenn hag a heuilfe an oll nevezentiou war dachenn ar zonerezh hag a vije digor d'an oll stummu a vuzik er vro-mañ.

Gand se avad, an diou gelaouenn a zonerezh on-eus evid ar poent, eo eta **Ar Soner**, ha **Musique Bretonne**. Bez' ez eo an hini genta hini **Bodadeg ar Sonerien (B.A.S.)**, pa zeblant eben beza muioh-mui war gont **Dastum**, ha setu perag moarvad eh embann muioh-mui a bennadou diwar-benn ar hanaouennou koz. Ema erru an eil gand he niverenn 31, p'eo en em gavet eben gand he 270ved.

Ha marteze just a-walh, e tiskouez an diforh-se peleh ema an dalh. Pa 'z eo bet savet **Ar Soner** war-lerh ar brezel, (bez' e hellje beza bet e galleg: « Le musicien breton... »), ez eus bet roet dezi c'hoaz eun ano brezoneg, evel m'eo brezoneg ano ar strollad e-unan. Hag e brezoneg ema ivez ar ger-stur dindan an tilt: **Traou Breizh a zo hon traoù**. Med n'eo ket evid se, ez eus muioh a vrezoneg war **Ar Soner**. En oll, diwar ar peder niverenn a zo bet embannet abaoe miz mae (niv. 267-270), da lavared eo diwar 48 pajenn a vent vraz, n'eus ket eur bajennad a-bez e yez ar vro. Hag euruzamant, e oa bet aozet ar priz **Jef ar Penven**, da geñver **Kan ar Bobl**: evel-se, he-deus gallet **Ar Soner** embann an diou ganaouenn a oa bet priziet. A-benn ar fin, n'eus a vrezoneg amañ nemed an talbenn: e galleg e vez kement tra all...

Pa 'z eo bet savet **Musique Bretonne** avad, eun nebeud bloaveziou 'zo, eun ano galleg eo a zo bet roet dezi, ha n'eo ket « Sonerez », da skwer. E galleg e vez skrivet ivez evid ar peb brasa: ar studiadennou, ar hemennou, ar rentao-kont... A-wechou e vez eur hemenn berr bennag e brezoneg, evel hini ar zonerien treujenn-gaol. Afiez a-walh e vez embannet kanaouennou brezoneg, evel re goz Tintin Mari, pe re nevez Yves Le Roux euz Poullaouen. Med neuze, e lakeer bewech ar brezoneg keñver-ha-keñver gand eun droidigezh halleg.

Ha ne oar ket an darnvuia euz ar zonerien a vrezoneg ken? Ha kollet eo da vad en o zouez?

J.S.

- **Ar Soner**, Yvon Goarant, 62, ru Emile Zola, 56100, An Oriant. Koumanant evid eur bloaz: 60 lur.
- **Musique Bretonne**, Michèle Bouedec, Mane Nazen, 56700, Kervignag. N'eus priz merket ebed evid ar houmanant.

Fañch BROUDIG

LIBERTERIEN OH EMBANN EUR GELAOUENN VREZONEG :

BRUG : 1913-1914

42 lur

30 barz troet e kembraeg

An darempredou kulturel etre Breiz ha Bro-Gembre a gendalh da vond war-raog mad a-walh. Embannet e vez du-hont troidigezioù diwar ar brezoneg hag eul leor-dom da zeski brezoneg dre ar hembraeg am-eus gwelet nevez 'zo. En or bro e kaver ivez tu da zeski ar hembraeg e meur a feson.

A-hend-all, Kembreiz yaouank bet war o studi e Breiz, ha desket mad ganto ar brezoneg, a bleustr atao war or yez eur wech distroet d'ar gêr. **Dewi Morris Jones**, anavezet mad e Skol-Veur Vrest bremañ zo eun nebeud bloavezioù, a jom feal d'ar brezoneg. Gand skoazell or henlabourer **Mikael Madeg**, ema o paouez lakaad embann eun dastumad barzonegou ha kanaouennou brezoneg euz an amzer-vremañ, troet e kembraeg. An diou yez a zo keñver-ha-keñver hag evel-se e heler êz-tre keñveria anezo.

Dibabet a zo bet oberennou 30 barz euz or bro, ken disheñvel ha Roparz Hemon, Youenn Gwernig, Naig Rozmor, h.a. An oll a zo bet renket hervez reiz al lizerennou hag e fin al leor e kaver notennoù berr diwar-

benn buhez ha skridoù ar varzed.

Eun dastumadenn barzonegou a-zoare eo **Du ha Gwyn** (1), moulllet brao dindan eur golo livet, hag a ra ober gwelloc'h anaoudegez gand eul lodenn euz lennegez an amzer-vremañ e Breiz.

P.M. Mevel.

(1) **Du ha Gwyn**. – **Gwenn ha du**. *Eun dastumad barzonegou brezoneg troet e kembraeg. Eul leor aozet gand Dewi Morris Jones ha Mikael Madeg. Embannet gand Y Lolfa, Talybont, Bro-Gembre.*
Tu a zo da brena al leor digand Brud Nevez euid £2.50 (27,50F) (150g)

Keleier ar miz

Euz an eil devez d'egile

– Dija, eo eur helenner euz skol-veur Roazon, **D. Fernandez**, eo e-noa paket ar priz **Goncourt**. Goude-ze, o-deus daou Vrestad bet an eurvad da veza priziet d'o zro, ha da gaoud, unan anezo ar priz **Medicis**, hag egile an **Interallié**, daou all euz ar prizioù lennegez galleg hag a gont. Roet eo bet ar Medicis da **J.F. Josselin** (ano-pluenn J.F. Ratinaud, e gwirionez), euid e 6ved leor: **L'enfer et Cie**, eun istor a vezvenen sañset. Boazet eo ar skrivagner da embann pennadoù er **Nouvel Observateur**.

An Interallié eo **Eric Ollivier** e-neus bet anezañ euid e romant **Orphelin de la mer**, ma kont ennañ perag, goude beza bet kollet e dad, e oa bet divvennet outañ tostaad euz ar mor, euid ma n'errufe ket gantañ ar memez tra. E Rekourañs eo ganet E. Ollivier e 1927.

– Kement ha komz euz leoriou, eo dao menegi tri leor all hag a zell a-dostoh marteze ouz ar Vretoned. Eul leor istor da genta, hag e-noa lakeet tud 'zo da skrijal ha d'ober lammou pa oa deuet er-mêz euid ar wech kenta e 1977. Hini **Yannick Guin** an hini eo, hag e-neus studiet istor Breiz euz Dispah 1789 beteg hirio. War dezennou an italian Gramsci eo diazezet e leor, hag a zo, gwir eo, eur seurt dispennadur euz ar vroadelouriez vreizad. Gand Maspero eo bet embannet al leor.

Per-Jakez Helias, goude m'e-neus gwerzet 1.200.000 skwrenn euz e **Cheval d'Orgueil**, a gaver hiviziken e oberenn dindan stumm eul leor godell kempenn. Euz hemañ, zo bet gwerzet dija 60.000 skwerenn en eiz teiz nemetken. Gand Gallimard eo embannet bepred.

Meur a studiadenn zistag e-neus strollet **F. Falc'hun** diouz e du en eul leor hepken, hag a zo gouestlet a-bez d'an anoù-leh. An disple-

gadur a ro euz eur bern anoiou-leh euz ar Frañs, dre ar brezoneg hag ar hembraeg. Sed eo bet ze eun digarez d'ar hazetennou da houlenñ ha **komz a rafe ar Vretoned galianeg heb gouzoud dezo?** Gand an ti Slatkine, euz Jenev, eo bet adembannet al leor.

- War a zeblant, n'a ket peurvad peb tra e **R.B.L.**: daou zevez diskrog-labour a zo bet e miz du, ha da geñver an deveziou-ze, o-deus komzet ar grevisted euz **personelez** ar radio. Ouspenn-ze, e-neus kavet gwelloc'h unan euz ar re a oa abadennoù ar zul war e gont, rei e zilez...

- Derhel a ra **Strollad ar Vro-Bagan** war e lañs. A beb seurt peziou all a zo gantañ war ar stern. Unan euid ar vugale, **Marzin-Circus**, hag a hello beza displeget er skoliou, gand mui pe vui a vrezoneg diouz ar vugale a vo c'hoariet dirazo. Peziou all, rimadellou ha kontadennoù, euid ar re goz. Ha neuze: **Kernevez City**. Ar pez-mañ eo emaint e soñj da hoani, diouz kleved, pa vo echu ganto ar **Spontuz Circus**. Petra vo? Eur « western kig-ha-fars », sañset, gand dañserez ha toud... Diêz gouzoud en a-raog petra eo ar seurt « western »-ze... Mall a vo war an oll adarre da weled ar Strollad en e oberou.

Cheñchamant: an nehamant

- **Ni ar Gelted**: sed ar varzoneg diwar bluenn **Youenn Gwernig**, a zo bet dalhet gand **Komite Gouelioù an Oriant**, euid ma vije kanet gand kanerien euz peb bro geltieg, da geñver devezioù **Kan ar Bobl**, a-benn Pask. Rag euid ar wech kenta, e vo digemeret kanerien euz ar broioù keltieg tra-mor e kenstrivadegoù **Kan ar Bobl**.

Krog eo a-hend-all ar memez komite da ziskuilla danvez **Gouel Etre-keltieg ar Viniaouerien**, a vo greet ar bloaz a zeu euz ar henta d'ar 15 a viz eost. Bez' e vo eun nozveziad gand kanerien euz ar Hebek hag euz ar vro-Vask. D'an 8 a viz eost, e vo tu da gleved eur simfonienn nevez savet gand an iwerzonad **Shaun Davey** (an hini e-neus skrivet **The Brendan Voyage**), hag a vo c'hoariet gand 200 a vuzisiañned. Eun devez braz da zehel diwar-vremañ.

- E Pariz eo bet dalhet bodadeg vloaz an **D.P.L.F. (Divenn ha kas war-raog Yezou ar Frañs)**. Greet eo bet an dro euz an oll gudennou a zo da rei eur gwir statut da bep hini euz ar seiz yez a heller kleved war zouar ar Republik. Ha lavaret zo bet gand an oll e oa pell-braz reolennoù nevez Ministr an Deskadurez diouz ar promesaou sklêr a oa bet greet gand ar Prezidant Mitterrand.

Er henta derez, abaoe daou vloaz, n'eus bet krouet postou euid kelenn ar yezou-rannvro nemed 0,00087 % euz an oll bostou bet krouet etretant: 43 diwar 46.683. En eil derez, eo strisoc'h e peb leh ar reolennoù Savary (nemed e Breiz, sañset), euid ar re a-raog. Er skoliou-meur, e naher rei eun DEUG (nemed d'ar hatalaneg) hag al lisañs (nemed d'ar brezoneg). Er radio hag en tele, e tispigner arhant braz euid an abadennoù e yezou estrañjour, med ne reer ket euid ar brezoneg nag euid ar yezou all. Ema **D.P.L.F.** o vond da houlenñ digand ar strolladoù deuteed hag o-deus diskouezet kaoud eun tamm preder bennag gand ar yezou-rannvro, disklêria a-nevez eun danvez-lezenn hag a rofe o gwir flas dezo war beb tachenn.

- **Michel Quesnel** eo a zo bet anvet da **Brezidant ar Huzul Sevenadurel**, e plas **Michel Denis**, en em denne. Bet e-neus 24 mouez, pa n'e-neus bet **P. Denez** nemed 19. Euz Béthune eo genidik ar Prezidant nevez, med 32 vloaz 'zo ema o chom hag o veva e Breiz, ken ez eo deuet da veza, emezañ e-unan, **eur Breizad a galon**. E-pad tri bloaz eo bet e penn Skoliou-Meur Breiz-Izel.

Kared a raje ar **Huzul Sevenadurel** beza gwelloc'h selaouet gand ar Huzulioù departamant: gand ar re-mañ, a-benn ar fin, an hini a vez ingalet ar zikourioù a vez roet a-berz ar Chart. Ha cheñch a rafe doarec ar Huzul Sevenadurel? En em rei da gleved a fell dezañ da vihana, ha goulenn a dle beza digemeret tro ha tro gand Ministr an Deskadurez, ar Huzul-rannvro, ar huzulioù jeneral, hag all... Ma teu eun dra bennag diwar ze, ne vo nemed gwelloc'h a ze.

- Galvet e-noa strollad **Ar Gelennerien Vrezoneg** an deuteed da gomz er Gembr an devez m'o-doa da zigemer budjed 83 an Deskadurez, euz ar hudennou a zo da gelenn ar brezoneg evel m'eo dleet. Setu ar pezh e-neus greet depute Sant-Brieg, **Y. Dollo**. Da c'raet, e-neus greet e hourhemennou d'ar Ministr Savary dre ma weler, emezañ, ar cheñchamant o tond war an dachenn-ze. Nemed ez eus nehamant, hervez Y. Dollo, dre ma ne ouezer ket gand peseurt arhant e vo greet war-dro kelennadurez ar brezoneg e 1983.

Respondet e-neus A. Savary ne oa ket gouest da zisklêria peseurt kont arhant a zispigno euid se, dre ma reer a beb seurt traoù disheñvel-tre an eil diouz egile war an dachenn. Tri bloaz a zo ezomm, emezañ, da weled ervad pere eo ezommou an dud. Pouezet e-neus ar Ministr evelkent da lavared e ree muoc'h euid ar yezou-rannvro euid na oa bet greet biskoaz « a-raog ».

- Abaoe 1968, eo bet kresket euz a galz an dud e departamanchou

an arvor, hag abaoe 75 dreist-oll, ez eus bet muioh e dud o tond da jom enno evid na zo bet o tivroa diouto. Gwir eo ze dreist-oll e Penn-ar-Béd, er Morbihan hag e bro an Naoned. Muioh-mui e vije dedennet an dud gand ar mor, ha setu perag e teu servijou nevez d'en em ziazeza muioh-mui en arvor. Sed aze hag a vije unan euz brasa kenteliou an niveridigez diweza. Rag e-pad keid-se, ez eus rannvroioù all, en hantemoz pe e kreiz ar Frañs, hag a zo war ziskar lip... Beteg-henn e oam boazet da glevet ar hontroull...

- Hag anaoud a rit **War 'l Leur**? Evel **Kendalc'h** eo eur bodad a gelhiou keltieg, med kalz sioulloh. Krog eo avad an deveziou-studi a vez lakeet gantañ war-zao d'ober muioh a vez: setu da nebeuta ar pez a zo bet lavaret devez ar-vodadeg-veur e fin miz du. Digemer ar vugale yaouank a ray ivez **War 'l Leur** diwar-vremañ, da rei dezo anaoudegezh euz ar folklor... Adanvet eo bet **P. Morin** da Brezidant.

- Prizioù a lennegezh, c'hoaz ha bepred. N'eo ket ken brudet ar re-mañ hag ar re all, med n'eus ket d'ober fae warno. Gand **Skrivagnerien ar Hornog**, ez eus bet roet eur **Priz braz** da **Henri Pollès** evid e romant: **Sur un fleuve de sang, vient parfois un beau navire**: eun nebeud deveziou goude, eo dezañ e roe ivez an **Académie Française** ar priz **P. Morand** (euz eun dalvoudegezh a 300.000 lur!). **Youenn Gwernig** e-neus tapet kaoud **Le prix du Grand-Ouest**, mar plij, evid e romant **La Grande Tribu**. Roet eo bet dezañ e Roazon war an ton braz, d'an 8 a viz kerzu.

Jef Philippe eo e Sant-Brieg e-neus resevet ar **Priz Langleiz** evid e leor barzonegou: **Telenn ar c'hi** (embannet gand « Hor Yezh »): eet e oa kalz a vrezonegerien da zaludi anezañ.

Eur helenner awenet

- Anaoud a reer gwerz Jenovefa Rustefan, er **Barzaz Breiz**. Eun danevell hir a 30 pajenn, hini **Jenovefa Rustefanovitch**, ema **Per Denez** o paouez skriva war niverenn ziweza **Al Liamm**, hini miz gwengolo ha miz here. **Per Denez**: ar Breizad, brezoneger ha broadelour, kelenner skolveur, barz, danevellour, skrivagner, yezoniour, stourmer, rener-kelaouennou, embanner, penn-rener ha kadoriad anavezet mad.

A-dra-zur ne oa ket **P.D.** o klask beza gwelet mad gand ar gomunisted (na gand kalz a dud all, e-neus lakeet ivez 'barz an taol, na pa vez ken nemed ar re a skriv e doare-skriva ar skol-veur...) oh embann eur seurt

danevell: eun istor a garantez, sur mad, mez ivez eur skrid a-eneb ar gomunisted evel n'eus bet embannet nemed ral a wech, abaoe pell, e brezoneg.

Rag d'ar mare ma tremen an istor, e-kreiz ar henta kantved warn-ugent, eo bet aloubet an Europ a-bez, ha Breiz da heul evel just, gand ar... Rused. Diwar neuze eo renet ar vro hag an dud, ha pa lavarer « renet », n'eo ket ober van... En e zanevell, e weler ervad e-neus P.D. kontet Breiz ar henta kantved warn-ugent evel m'ema ar Rusi (pe evel a zoñj dezañ ema?) en deiz a hirio. Fenti a reer o weled penaoz e-neus kavet an tu da rusianekaa an anioù-kèriou hag an anioù-tud (Novo-Kemperogorsk, Bourblanski, Merserograd, hag all...) pe da vrezonekaad re all (evel hini Leonidig Breizhneveg, a studier e leoniou e skol ar Falhuned Ruz...). Hervez R. Laouenan, war an **Télégramme**: *un genre d'histoires qui risque de faire grincer des dents et réjouira les autres*. Oh embann eun danevell war an ton-ze, e-neus P.D. heuillet eur hiz diazezet mad en Europ hag e Bro-Hall abaoe eun nebeud bloaveziou. Ma klevje kaoz anezi eur serten intelligentsia 'zo euz Pariz, e vije greet dezañ eun digemer euz ar re hweka. Red e vije dezañ hasta buan da drei anezi e galleg...

- Tamm ha tamm e klevet peseurt bamedigez a vez douget gand ar strolladoù divenn ar yez, diwar-benn ar plan kinniget gand ar **Rektor Akademiezh** da wellaad kelennadurezh ar brezoneg. Evid **Diwan**, n'eo ket kelenner e brezoneg eo a vo greet, med kelenner brezoneg: setu n'eo ket prest ar skolioù brezoneg d'en em lezel da veza lonket gand **Servij an Deskadurezh**, ma n'int ket sur da helloud derhel da labourad evel a reont. Evid **Skol an Emsav**, eur gwir framm a ra diouer er raktres... *Chom heb rei d'ar brezoneg ar memes statut evel (sic) d'an danveziou all na hallfe nemed startaad ar zoñj e vez greet gaou outañ a-ratoz-kaer.*

Tud zo a zeblant beza dedennet gand kinnigoù ar Rektor daoust da ze: e Sant-Rivoal, e vije kerent prest d'en em voda da houlen euz skol diouyezeg.

0 E Kemper eo bet en em vodet animatourien eur 15 bennag a radioioù-bro euz ar 5 departamant - radioioù hag a embann sklér ez int *dishenvel* euz **R.B.I.** koulz ha deuz ar postou hag a zigemer bruderez dre guz. Int a fell dezo respont d'eur goulen a-berz an dud a zo o chom en eur homad-douar, ha dre ze e fell dezo kaoud o lod euz an arhant publig, ha ne vo roet moarvad nemed da R.B.I. Piou a lavaro deom ha klevet e vez brezoneg war hini pe hini euz ar radioioù-bro-ze, ha pegement?

- E Malansag, er Morbihan, e oa bet soñjet rei ano rener ar Chouanted en amzer an Dispah, hini **G. Cadoudal** eta, d'eur C.E.S. nevez a 260 a vugale, a oa da veza digoret war an ton ofisiel d'ar 17 a viz kerzu. N'eo ket bet a-du **Kuzul Akademiezh Roazon** gand eur seurt kinnig. Digoret eo bet ar skolaj, med n'eus bet roet ano ebed dezañ.

- Evid ar wech kenta ez eus bet divvennet dirag Skol-Veur Vrest eun dezenn medisinerez a oa bet skrivet e brezoneg. Ne oa nemed **Goulc'hen Kervella** evid ober kemend-all. Ha digemeret eo bet da vedisin gand ar jury a oa an dean **G. ar Menn** en e benn. Danvez an dezenn: medisined ha lennegezh vrezoneg en 19ved hag en 20ved kantved. Ema G. Kervella a-hend-all oh echui eul leor e brezoneg bepred, evel just, diwar-benn Laenneq.

- 57 vloaz a velegiach, 25 bloaz a eskobiezh: piou a hell embann kemend-all, nemed an aotrou 'n eskob **Visant Fave**. D'an 12 a viz kerzu tremenet, ez eus bet lidet eur gouel en e enor en iliz-veur Gemper, da geñver pardon Sant Kaourantin. E 1957 an hini oa bet anvet da eskob.

V. Fave eo bet tomm e galon atao ouz ar brezoneg, ar yez kenta a gomzas, a-raog deski galleg. Labourer e-neus, hag e ra c'hoaz, da drei an Aviel. E-pad 13 vloaz eo bet aluzenner ar Bleun-Brug; goude beza bet greet war-dro ar JAC. Derhel a ra da gaoud daremprejou gand an 2.200 a visionerien ginidig euz Penn-ar-Béd hag a zo strewet dre ar béd-oll, ha pa vez bet o weladenni anezo, e skriv eur renta-kont euz e veajou, e brezoneg bepred, war **Lizeri Breuriez ar Feiz**.

Eun taol-lagad sizuniezh

- Eur hard-eur sizuniezh ouspenn a vrezoneg war an tele: setu hag a zo profet deom gand FR3 a-benn an Nedeleg. Eun abadenn a geleier eo a vo, hag a vo skignet beb gwener da noz, etre 8 eur nemed 20 hag 8 eur nemed pemp, adaleg ar 24 a viz kerzu. Heh ano: **An taol-lagad**. Fiziet eo bet an abadenn nevez e **F. Broudig**.

- Eun dezenn all c'hoaz, eo an hini e-neus divvennet **J-Y. Urien** dirag skol-veur Breiz-Uhel e Roazon, diwar-benn frazennadur ar brezoneg a-vremañ: penaoz e vez ereet ha liammet ar gerioù kenetrezo. Kelenner eo J.Y. Urien en U.E.R. ar yezou.

- E Kevrenn Geltieg skol-veur Roazon koulz hag e hini Brest, e tle beza anvet beb a gelenner all war ar brezoneg. Hervez ar vrud, hag hervez

an dibabou a vije bet greet, eo **Yann-Ber Piriou** a vije anvet e Skol-Veur Breiz-Uhel, ha **Yann-Erwan Plourin** e hini Breiz-Izel.

- An Dr **Yann Daumer**, eil-mêr e Brest, a gustum skriva pennadoù e brezoneg war gelaouenn ti-kêr Brest, **Brest-Espoir**. Skriva lizerou brezoneg a reer dezañ ivez. War golo unan avad, e oa bet notennet: *incompréhensible: veuillez écrire en français, svp*. Eul lizer-klemm e-neus kaset kerkent an Dr. Daumer da Vinistr ar P.T.T.. E brezoneg, emichañs.

- Stourm evid ar brezoneg a reer ivez e bro-Bariz. Greet ez eus bet « kenteliou stourm » e gariou Montparnasse ha St-Lazare. 3.000 a dud o-deus lakeet o ano dindan eur mennad o houlenñ kenteliou. Kevrennoù sindikajou evel ar **SNES** hag ar **SGEN** a vez harpet ganto divennerien ar brezoneg e bro-Bariz. A-benn ar fin, eo 23 glas brezoneg a oa da veza digoret dre eno, e skolioù eil derez, hag a roje war-dro 40 eurvez a genteliou en oll.

- Klask a zeblant beza hardiz war an taolennou hag a lakeer dindan an talbenn **les écoles bretonnes**. 350 anezo a zo bet gwerzet e sal Vrest, e miz kerzu, ha gwerzet mad. Da 98.000 lur eo pignet al livadur: **Bretoned war an hent**, gand **Serusier**, da 68.000 lur eo savet unan all euz e daolennou. **De Bellay** eo bet prenet e re etre 20 ha 48.000 lur.

- **An Naoned e Breiz**: eun devez-studi a zo bet diwar ze d'an 18 a viz kerzu, en Naoned just a-walh. Lakeet e oa bet war-zao gand ar h/**CUAB**. Tost da 200 a dud o-deus heuillet ar forum. Dre gomisionou zo bet labourer ivez, diwar-benn an istor hag ar zevenadur, an daremprejou gand ar rannvroioù all, ar hoñvers... Lavaret eo bet ne oa ken nemed 3 lise euz an Naoned o rei kenteliou brezoneg, pa ree an oll anezo daou vloaz 'zo. Lavaret eo bet ivez ar pez na oa ket dihortoz eno: e vije Breiz unan euz ar rannvroioù kenta ha galloudusa en Europ, ma vije staget ar Sved departamant (ha zoken ar Vañde, hervez lod...) ouz ar pevar all...

- Manifesti en eun doare digustum o-deus greet eur hant a dud euz **Skol an Emsav**, d'an 18 a viz kerzu, e Kemper: dirag ti ar Prefed, komiser ar Republik, o-deus digaset panoñsou a oa bet displantet ganto diwar vord henchou e Breiz a-bez. Er stumm-ze e fello dezo goulenn ma vije skrivet an anioù-kêrioù, brezoneg ha galleg keñver-ha-keñver.

Leoriou ar miz

Alan an Diuzed

Lenaig

Eur romant a garantez

15 lur (150g)

Bleun-Brug

Dilun, dimeurz, dimerher...

Rimadellou nevez evid ar vugale

20 lur (200g)

Bugale Skol Blouhineg

Rouanez ar gorrigez

gand eun droidigez en esperanto

10 lur (150g)

Aotrou KERMARIA

AR BREZONEG

dre

an

TREUZVIEZADENNOU

Rakskrid, diskoulmou ha geriadurig
gand

P.M. MEVEL

« Unan euz al leoriou plijusa am-eus bet tro da lenn abaoe
eur pennad mad... E brezoneg ne oa bet embannet seurt ebed
a-seurt-se c'hoaz... »

J. Salaun.

Priz : 10 lur (70 g)

Mikael MADEG

PEMP TROAD AR MAOUT

danevellou

434 bajenn.

30 lur - 550 g.

Kalz Brezonegerien n'anavezont ket c'hoaz **BRUD NEVEZ !**

Sur eh anavezit-c'hwi keneiled, kamaradou, amezeien, tud hag a vije laouen o lenn eur gelaouenn vrezonég evel **Brud Nevez!**

Ne gav ket deoh eo **Brud Nevez** ar gelaouenn ha n'heller ket dianaoud?

Ar mare eo, d'ober profou! Profit eur houmanant d'unan bennag ha n'eo ket koumanantet c'hoaz, hag e vo astennet hoh hini deoh-c'hwi euz tri miz, evid netra!

Pe neuze, roit deom da houd anoïou an dud a garfeh e vije kaset **Brud Nevez** dezo eur wech evid netra, dezo da weled petra eo!

Leugnit ar follenn-mañ, pe adskrivit anezi war eur follenn-baper all, ha kasit anezi da: Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.
Trugarez deoh en a-raog!

Va ano ha va ano-bihan.....
O chom emañ e.....

Ano hag ano-bihan ar houmananter nevez:.....
o chom e.....

Pêa a ran..... lur: dre chekenn-vank war ano Brud Nevez / dre chekenn-bost:
Brud Nevez KRP 893-94 P Roazon.

Ar re a gavo meur a goumananter all da Brud Nevez a vo astennet dezo o houmanant euz tri miz dre goumananter!

Kasit, mar plij, eun niverenn euz **Brud Nevez** evid netra da:

Ano hag ano-bihan.....
o chom e.....

Ano hag ano-bihan.....
o chom e.....

Ano hag ano-bihan.....
o chom e.....

